


EMSAV



KELACUENN BOLITIKEL

MIZIEK

Niv. 28 - Ebrel 1969

An niverenn : 2,00 F

Koumanant-bloaz : 20,00 F

Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver

EMSAV

30, Place des Lices, 35 - RENNES

C.C.P. RENNES 2 460 10

T a o l e n n

Kentnotenn	p. 92
An Emsav hag ar Vro (13) [EMVR-60 - 66]	p. 93
Lizheroù p. 93 : F.L.B. p.93, Keal an diempradur p.104, Ster ar Chouanerezh e Breizh p. 111, Istor an Emsav p. 115, Studierion vrezhon ar skolioù-meur gall p. 119, Kevredigezh an Emsav p. 119; Danevelloù obererezh (Skourr an Deskadurezh Vroadel : Bodadeg Vloaz 1969, Danevell obererezh Kelc'h Debauvais, Kentelioù nevez embannet gant S.A.D.E.D.) p. 125.	

KENTNOTENN

Ar rann An Emsav hag ar Vro a ya d'ober an niverenn-mañ en he fezh hag, evel ma weler, e leugn lodenn al Lizheroù an nav dekvedenn eus ar rann-se.

An abeg eo ez eus degouezhet gant ar gelaouenn lizheroù a-bouez o tennañ da gudennoù-bremañ an Emsav. Pleustret eo bet aketus war danvez al lizheroù-se e-ser bodadoù-breutaat. Embann a reomp amañ war un dro ganto an evezhiadennoù a zo frouezh ar studi bet renet warno.

E gwir, kentoc'h eget ur c'henskriverezh, e kaver en niverenn-mañ ur gendael dre skrid, - ha ned eo ket marteze an hini disterañ eus ar c'hendaelioù he deus bet Emsav tro da embann betek-henn.

A N E M S A V H A G A R V R O (1 3)

LIZHEROU

Amañ dindan ez embannomp ul lizher-stroll a-zivout danvezioù 'zo eus an niverennoù 25 hag 26. Evit aesaat al lenn e roomp hon evezhiadennoù diouzhtu goude pep hini eus ar peder lodenn a ya d'ober al lizher : F.L.B., Keal an diempradur, Ster ar Chouanerezh e Breizh, Istor an Emsav. Ouzhpenn-se, e lakaomp un embannverk disheñvel war bep lodenn.

"F.L.B. [sl. Emsav 25/3]

"Tud 'zo n'eo deus ket komprenet mat ar pennad a zo bet gouestlet d'an F.L.B. dre ma n'eo ket bet resizet a-walc'h marteze ster gerioù 'zo.

5 "Pal an Emsav zo prientiñ adal bremañ frammoù ar Stad vrezhon da zont. Ar Stad vrezhon ne c'halla kaout nemet ur yezh : ar brezhoneg. Adal bremañ e rank eta izili an Emsav ober eus ar brezhoneg yezh o labour adsevel ar vro ha yezh o darempredoù kefridiel ha personel kenetrezo.

10 "Al ledemsav d'ar c'houlz-se a c'hoarvez eus ar vrogarourion a ra gant ar galleg, dre ma ne ouzont ket ar yezh o-unan, pe dre ma rankont ober gant frammoù dic'houzvez eus ar yezh. Koulskoude e kav deomp e ranker amañ klask digemmañ meur a rumm.

15 "Betek bremañ e oa bet graet gant ar ger ledemsav evit envel ar stourmerion a garfe kempenn ar Stad c'hall evit klenkañ Breizh enni hag a asant eta da zreibeli ar Stad-se er vro, lakaet e teufe houmañ da brofañ un tamm emrenerezh da Vreizh.

20 "Ret eo anzav ez eo en em ziskouezet an F.L.B. er penn-kentañ evel ul ledemsav; en e luganoù e rae van da grediñ e oa a-walc'h 'stourm ouzh gwallvererezh ar Stad c'hall e Breizh' evit reiñ un diskoulm da 'gudenn Vreizh'.

25 "Ret eo notañ koulskoude ez eus deuet un emdroadur e 'politikerezh' an F.L.B. dre ma'z eo tremenet ar mizioù. Ar Manifesto da skouer a c'houlenne an dishualded. Dre vras koulskoude e hañvale an Talbenn bezañ renet pe bellvleniet gant gallegerion ha lakaet en defe gallet kemer ar galloud e Breizh, - hogen daoust ha bukañ a rae ar renerion anezhañ e gwirionez da hevelep uhelbal ? - e vefe bet gallek ar Stad en defe savet.

30 "Pezh a c'haller tamall a-hend-all d'an Talbenn eo e amsteriegezh. War a hañval ne felle d'ar re gentañ a aozas anezhañ nemet ober un tamm trouz. Darn eus ar re a oa ennañ avat, dre ma tremene an amzer, ha goude bezañ dastumet danvez tarzha graet taolioù e-leizh hep bezañ paket a gemeras hardishegezh hag en em

35 c'houlennas ha ne vefe ket tu d'ober un dispac'h e Breizh goude
 holl peogwir ez ae ken mat an traoù en-dro. O vezañ avat m'o doa
 douetañs war dro-spered ar boblañs en o c'heñver ne gredent ket
 mont re bell evelato. Da lavarout eo, degouezhet war ribl ar Rub-
 ikon, int chomet en tu-mañ e-lec'h mont en tu all. N'o deus ket
 40 kroget gant an dispac'h ha netra ne ziskouez e oant mennet da vat
 da gregiñ gantañ.

"Diwar gement-se holl e c'haller dastum ez eo bet an F.L.B. ul
 luskad savet war ar prim, gant tud ha n'ouient ket re vat pelec'h
 ez aent ha n'oant ket asur war an hent a oa da gemer. Dre-se end-
 eeun, - pa na ve ken, - e oa tonket dezhañ c'hwitañ.

45 "Arabat eo lavarout ez eo bet didalvez pe noazus hepken ober-
 erezh an F.L.B.. An holl Vrezhoned er c'hontrol a rank bezañ
 anaoudek ouzh paotred an F.L.B. dre m'o deus broudet ar spered
 broadel en ur gemer riskloù bras. Ha ne gav ket deomp e ve reizh
 o dismegañsiñ e nep stumm o vezañ ma n'eo ket c'hoarvezet gant
 50 hini eus ar re a chom er-maez eus an abadenn kemer biskoazh
 hevelep riskloù.

"Arabat eo avat evit kelo-se ivez reiñ muioc'h a bouez d'an
 F.L.B. eget n'en deus. Daoust ma soñje d'ar re a oa en urzhiadur-
 se e oant emsaverion, - hag e gwir e oa an darn vuiañ anezho
 55 emsaverion ouez kentoc'h eget ledemsaverion, - ez eo tonket d'o
 obererezh tremen d'un obererezh ledemsavel dirak meno foran Breizh,
 koulz hag hini Bro-C'hall, dre'n arbenn end-eeun ma n'o deus
 boulc'het dispac'h gwirion ebet. Ha se a vo anat e-pad ar prosez,
 - mar bez graet unan, - pe zoken mar bez divac'het ar brizonidi
 60 hep prosez ebet evel ma c'hell c'hoarvezout ivez, o vezañ ma ranko
 an alvokaded reiñ da grediñ d'ar varnerion evit dedennañ o zrugarez
 ne felle d'o c'hlianted nemet 'dedennañ evezh ar gouarnamant war
 reuzeudigezh o rannvro'. Ar ster a zo fellet d'ar stourmerion-se
 reiñ d'o emgann zo war var da vezañ distreset.

65 "Resizañ kement-se zo lakaat a-wel kudenn an ober gant an nerzh
 e Breizh en degouezhennoù a-vremañ. War a hañval, un ober gant an
 nerzh ne c'hell ket disoc'hañ evit ar poent er vro-mañ. Diouzh un
 tu all, un dispac'h kaset re brim da vat, - mar grafe berzh ha
 lakaet e ve gallus, - a c'hell disoc'hañ da vezañ noazus mar tenn
 70 da ziazezañ frammoù gallek er vro-mañ. Se a ranker anzav moarvat
 hep ankounac'haat evit se e c'hell an dispac'helouriezh veizel rik
 treiñ d'un doare kempennelouriezh nevez, e-giz hini ar F.C.F. e
 Bro-C'hall.

75 "Evit echuñ e lavarimp ez eo didalvez burutellañ embregadennoù
 'zo goude ma vent digoulz ha gwallus e keñverioù 'zo. E-pad ar
 brezel diwezhañ, da skouer, e rankas ar C'hallaoued ivez sevel war
 ar prim rouedadoù a bep seurt, dizunvan ha digenstag, a oa tonket
 dezho c'hwitañ. Ar re a oa atebek warno a oa brogarourion hep
 raktres na mennad politikel resis. Roll DE GAULLE end-eeun ez eo
 80 bet unvaniñ ar strivadennoù en ur framm politikel a zlee en diwezh
 adsevel ar Stad c'hall. E pep derou ez eus atav dizurzh ha mesker-
 ezh hep ma ve lakaet e kaoz evit se youl-vat ha brogarantez ar
 stourmerion." (26 03 69 - 1) EMVR-60

dezhañ binvioù arveradus, ha mar pled gant un dazont ez eo gant ar Vreizh fetis a laka da zont bemdez dre e labour, ur Vreizh nad eo ket ur baradoz met a zo bezant dirak dremm Breizhiz, dezho d'ober o dibab en he c'heñver ha dont da genderc'hel al labour boulc'het mar kavont o mad ouzh henn ober. Fiziañs a rank kaout an Emsav ennañ e-unan, rak kentañ tra en deus d'ober bremañ eo gounit fiziañs Breizhiz. Fiziañs a rank kaout ivez e pobl Vreizh ha krediñ ez eo spiswel a-walc'h evit diverzout he mad el lec'h m'emañ.

Mar gra hor c'henskriverion ur fazi ned eo ket o lakaat da bal an Emsav prientiñ adalek bremañ frammoù ar Stad vrezhon, met kemer ar pal-se da ziazez ha deverañ dioutañ ar palioù all, - lakaat ar brezhonekaat da skouer da amplegad benvegel ar sevel Stad, ar pezh a zo eilpennañ urzh reizh an amplegadur. Lavarout a reomp : ezhomm zo eus ur Stad vrezhon, ar benveget eo evit ma vevfe ur gevredigezh vrezhon perc'henn war he c'hevala istorek (ar yezh o vezañ un arvez eus hemañ). Hor c'henskriverion a lavar : ezhomm zo eus ar brezhoneg peogwir e fell dimp sevel ar Stad vrezhon, - ar pezh a zo reiñ d'an Emsav ha d'ar yezh un diazez tidel rik.

Diskouezet hon eus e lec'h all ez eo ar rezid evit ur bobl perc'hennañ hec'h istoregezh, a lavaromp c'hoazh bezañ en Istor. Diberc'hennet diouzh pep istoregezh, emañ pobl Vreizh en anistor; pe gentoc'h n'emañ en Istor nemet dre ur poent anezhi : hec'h Emsav. Hon diazez n'emañ ket en tremened; na lavaromp ket : hon Emsav zo diazezet war tremened hor bro, met : un Istor hon eus peogwir emamp en Emsav. Hon diazez n'emañ ket en dazont; na lavaromp ket : ar Stad vrezhon a roy an tu da saveteiñ Breizh, met : ar gevredigezh hag ar Stad vrezhon zo an Emsav. An diazez nemetañ evit ren un ober politikel, kevredigezhel, sevenadurel, armerzhel er vro-mañ eo an Emsav. Gwan eo an Emsav ? Kemerit eñ da ziazez hep termal hag e welot ned eo ket gwan. Klask un diazez all, gortoz n'ouzomp ket petore burzhud eus an diavaez, zo un touell hag ur merk a emzsisfiz.

(10) Termenañ a ra hor c'henskriverion al ledemsav evel ar vrogarourion a) a ra gant ar galleg b) a garfe kempenn ar Stad c'hall evit reiñ ul lec'h da Vreizh enni. Divastus eo d'hor meno an termenadur-se. Azonoù al ledemsav eo moarvat ar gallegerezh hag ar gempennelouriezh, met n'int ket a-walc'h da dermenañ an anadenn. Al ledemsav a rank bezañ termenet e pep mare evel un devoud kevredadel oc'h anadiñ er vaezienn stignet etre an Emsav hag ar galloud sujer (sl. Emsav 5/113 1967). An Emsav, diouzh e du, ned eo ket dre ret an dud a gomz eus "dis-hualded Vreizh" hag a ra gant ar brezhoneg; met un embregerezh istorek resis eo : diouzh un tu diazezañ pobl Vreizh evel kevredigezh perc'henn war hec'h istoregezh, diouzh an tu all argas ar sujerezh estren diwar ar gevredigezh-se.

Al ledemsav ned eo ket anavezadus enta diwar-bouez azonoù ergorel distag. Un devoud darempredel eo, da vezañ meizet evel

parzh en ur furm amzeriek. Displegañ a reomp. Un embregerezh kevredadel ha bellourel eo an Emsav, dezhañ enta ur sol, ur pal hag ur poell, - an teir elfenn-se oc'h emdreiñ gant an ober emsavel e-unan. Termenet eo, da heul, al ledemsav evel kement ober delusket gant ober an Emsav, er-maez avat eus poell istorek an Emsav. Ret eo merzout a-hend-all n'en deus ar ger 'ledemsav' ur ster nemet evit an emsaverion (a-enep d'ar pezh a lenner 1.55) : an Emsav hepken, pa oar e pep mare e pe lec'h emañ eus e hentadur, a c'hell divizout petra a zo ledemsav pe get; hag an hini a ren un ober ledemsavel ne c'hell ket merzout an diforc'h etre Emsav ha ledemsav. Aze e rankomp menegiñ un anadenn azonus eus ar furmoù amzeriek hag eus an istoregezh dre vras, a c'hallfed envel 'anadenn an tre' : ar pezh a oa Emsav en ur mare a zeu da vezañ ledemsav en ur mare da heul. Ur skouer a gavimp hep sevel gwall bell : an ober sevenadurel renet diouzhtu goude an eil brezel-bed a voe emsavel er mare ma edo an Emsav repuget ennañ, met adalek ar mare ma kreskas un Emsav politikel adempret e voe 'tre' an istoregezh e par an ober sevenadurel glan hag e teuas ar repu da vezañ ledemsav.

Ar gudenn bennañ a-fet ledemsav eo spisaat e roll e bellouriezh an Emsav. Al ledemsav a c'hell c'hoari a-du gant ar galloud sujer a-enep d'an Emsav : kounaomp an 'tousegi' goude an eil brezel-bed a dalvezas d'ar Frañsizion da bistriañ an Emsav dinerzhet repuget el luskadoù sevenadurel. En enep e c'hell ivez al ledemsav c'hoari a-du gant an Emsav : an F.L.B. e miz genver en deus gweredet war ar boblañs evel un amleder bruderezh, un atizer d'an emskiant vroadel. Greomp 'Emsav gouez' (55) eus al luskad-mañ, evit tuiñ d'hor c'henskriverion, ha peogwir en deus "broudet ar spered broadel", met petra soñj hor c'henskriverion eus ul lu a vez e dalc'h nerzhoù diavaez n'en deus ket galloud warno ?

Linenn-ober an Emsav dirak al ledemsav zo : a) dezrannañ an devoud kevredadel ez eo (kompren penaos e tiwanas al luskadoù 'touseg'; penaos o deus al luskadoù armerzhelour echuet er sponterezh) b) savelañ lec'h al luskadoù ledemsavel e bellouriezh an Emsav (an arm a-enep d'an Emsav e voe ar Skol-veur c'hall e 1950, ar benveg da atizañ an emskiant vroadel ez eo bet an F.L.B. e genver 1959) k) enframmanñ ent vellourel an ober ledemsavel e daelerezh an Emsav (war ar poent pleustrek-mañ e c'hwhitas Emsav ar bloavezhioù 50; re abred eo c'hoazh evit gouzout petore mad a ouezo an Emsav tennañ eus degouezh an F.L.B.).

(48) A-du omp gant hor c'henskriverion evit meuliñ kalonegezh tud an F.L.B.. Met deskrivañ (ha faltaziañ) ar pezh a vennent, a gredent pe a soñjent (30-40) ne zegas netra ouzhpenn d'an dezrannadur politikel istorel eus oberoù al luskad e-unan.

Un evezhiadenn hepken : dougen bri da galonegezh an dud zo mat. Met gwall zigalonekaus eo diskouez tud kalonek o c'hwitañ, - an hent asurañ da romantelouriezh ar gouron seul veuladusoc'h ma c'hwit bepred. Yac'husoc'h eo diskouez tud eus ar seurt boutin, o poaniañ aketus ha poellek e-pad bloavezhioù, ar pezh a zo kalonegezh ivez emichañs, hag oc'h ober berzh a-benn ar fin.

- 85 "Keal an diempradur. [sl. Emsav 26/42 hh.]
 "Ur c'heal nevez diwanet en Emsav eo hini an diempradur. Termeniñ a reer hemañ evel an disrann a zo savet etre renerion ha renidi e Breizh diwar an 10t, 11t kantved dreist-holl e-keñver yezh ha lakaat a reer hemañ kiriek da walldonkad Breizh er c'hantvedoù da heul.
- 90 "Ar c'heal-mañ, d'hor soñj, ne ro ket un diskleriadur gwirion eus istor ha planedenn hor bro. Reiñ re a bouez dezhañ a vefe kouezhañ er yezhelouriezh, da lavarout eo ober eus ar yezh ur pal enni hec'h-unan.
- 95 "Fazi an aozerion zo, war hor meno, diforc'hañ istor Breizh diouzh istor Europa dre vras. M'o dije studiet muioc'h istor ar broioù keltiek hag Europa dre vras, o dije meizet ne c'hell ket an diempradur diskleriañ kement a zo en istor hor bro.
- 100 "Notañ a raimp da gentañ n'o deus na Kembre nag Iwerzhon gouzañvet diwar an diempradur. Unyezh eo bet Kembre hag Iwerzhon e-doug ar Grennamzer. Padal int bet staget ouzh Stadoù estren abretoc'h eget Breizh ha Skos o-unan. A zo gwashoc'h : ober a rae ur barzh evel Gwilym ap DAFYDD gant ar yezh vroadel evit meuliñ dileuridi ar galloud saoz e Kembre. Hag en hor 'Breizh-Izel' vroadel, evel ma oar pep unan, ez eus bet kavet meur a varzh
- 105 brezhonek e derou ar c'hantved-mañ evit kanmeuliñ Bro-C'hall, ar vro vac'hom, e yezh ar vro-mañ.
- "Kemeromp bremañ ur skouer krennenedet ouzh houmañ, hini Bro-Saoz end-eeun. Er Grennamzer, en hevelep grez hag e Breizh eta, e rae an diempradur e reuz ken gwazh hag er vro-mañ : ar renerion a gomze galleg tra ma komze saozneg ar renidi. Kement-se n'en deus ket miret ouzh ar Stad saoz d'ober berzh e nep doare.
- 110 "Betek an 10t, 11t kantved e renas ivez an diempradur e Bro-C'hall end-eeun. Eno en enep e komze ar vrientinon hag ar rouaned germaneg tra ma komze romaneg ar boblañs. Eno n'eus savet kudenn ebet kennebeut.
- 115 "Ret eo ouzhpennañ e oa an diempradur liespazennek rak yezh an deskadurezh a oa al latin, dre vras, e renkadoù desket an holl vroadoù. Kement-se avat ne hañval ket bezañ lakaet kudennoù da sevel.
- 120 "D'hor soñj ez eo ur fazi klask diskleriañ ur rumm devoudoù dre ur rumm all a zevoudoù ha n'o deus netra da welout gant ar re gentañ. Ar fedoù politikel, - aozadur ar Stad, - a zle bezañ komprenet e framm ar politikerezh dre vras ha n'eo ket dre ober dave

- da zevoudoù yezhel a zo o-unan frouezh ar politikerezh.
- 125 "Ent pleustrek ha hiziv an deiz ez eo kasaus rankout anzav
- a-hervez - e ve bet gallekaet Breizh adal an 10t, 11t kantved.
Eneberion ar vroadelezh e Breizh a responto ez eo diboell neuze
"dic'hallekaat" ur vro a zo bet gall a-viskoazh, a sevenadur
koulz hag a yezh koulz lavaret. Anat eo koulskoude ez eus bet
130 kement a spered broadel e Breizh ar Reter romanek a yezh ha ma
oa marteze en ur Vro-Saoz gallekaet he brientinion d'an hevelep
poent. Gallet he dije Breizh mat-tre, gant m'he doa ur Stad dis-
hual er prantad-se, krouiñ ur sevenadur gwriziennel dre ar galleg,
Bro-C'hall hec'h-unan n'he doa krouet hini ebet d'ar mare-se, -
135 ar pezh a vanke dezhi ne oa ket ar yezh hogen ur vuhez kevredik
ha speredel gwirion.
- "Kavout a ra deomp eta ez eo arabat barn istor Breizh er c'hant-
vedoù tremenet hervez savboentoù ha pennaennoù an ugentvet kant-
ved. Moarvat, pep diempradur evel pep arallekadur pe pep dizunv-
140 anadur zo da lemel en ur vroad, rak galvedigezh pep broad eo bezañ
unvan evit gallout sevel ur sevenadur. Ha moarvat ez eo bet gwiriet
arvarusted ha noazusted an diempradur er c'hantvedoù a zo deuet
war-lerc'h ar Stagidigezh, ha dreist-holl abaoe ar Reverzhi
C'hreantel ha diazezadur ar Stad arnevez gallek ma oa Breizh
145 klenket enni. Hiziv an deiz n'eus mar ebet ne c'hell Breizh
dreistbevañ ha krouiñ ur sevenadur nemet oc'h en em ziforc'hañ
diouzh Bro-C'hall hag oc'h en em unaniñ dre ar brezhoneg. Diazez
hon hanvoud broadel eo eta ar yezh, hogen arabat e vefe e nep
keñver ober eus houmañ ur fetichenn." (26 03 69 - 2) EMVR-61

E/EMVR-61.- Trugarekaat a reomp hor c'henskriverion evit o
evezhiadennoù. Lakaet o deus war wel un nebeut kudennoù a-bouez
a zo dirak ar rummad istorourion o sevel hiziv e Breizh. Hogen,
a-raok mont d'o heul war an hentoù a ginnigont pleustriñ ez eo
mat distreiñ ur wech c'hoazh war dermenadur an diempradur.

Aon zo da gaout n'o deus ket hor c'henskriverion lennet gant
evezh ar pennad a varnont, a-hend-all n'o dije ket tamallet
dimp ar fazi gros ez eo kemer an azon evit ar c'hleñved. Lenn-
omp en-dro testenn an Notennoù evit kelenn an Istor :

'Evit kompren ar Stagidigezh, Istor Breizh da heul ar
'Stagidigezh ha zoken Istor an Emsav e ranker sevel pell-
'oc'h en amzer. Ret eo distreiñ d'ar mare m'he deus Breizh
'kollet he c'hreizennoù kevredigezhel ha war un dro hec'h
'unded. Ar Stagidigezh ned eo nemet un darvoud en Istor
'diempradur ar gevredigezh vrezhon.

'Unan eus azonoù splannañ seurt diempradur eo emzalc'h ar
'c'hendereoù-leviañ e-keñver ar brezhoneg. O tilezel ar
'brezhoneg en 12t kantved, e tistrujent unded ar bobl vrezh-
'on hag e prientent he faezhidigezh.' (Emsav 26/42).

Aozerion ar pennad a zeskriv an diempradur evel un devoud
kevredigezhel, sevenadurel, politikel, armerzhel tro ha tro.
Arabat diwelout avat ez eo donedigezh ar galleg e Breizh ouzh-

penn un azon a ziempuradur, buanaer an diempuradur e voe ivez : mar deuas peogwir edo ar c'hendereoù-leviañ dindan al levezon estren, e c'hoarias ur wech deuet evel ur benveg nerzhak a ziempuradur.

Neb a zifennfe an dezenn prestet dimp a rankfe anzav n'eo ket diempret ar bobl vrezhon en deiz a hiziv peogwir e ra al levierion gant an hevelep yezh ha braz ar boblañs. An diempuradur n'eo ket ur c'hleñved eus ar yezh pe eus an armerzh [1]. Pa lavaromp ez eo diempret ur gevredigezh e reomp dave da zevoudoù kevredigezhel resis ha da geñverioù ken resis-all etre he c'hendereoù. Ken skouerius eus diempuradur ar gevredigezh vrezhon eo stourm ar Chouaned pe emzalc'h ar vourc'hizion vrezhon e-pad ar Reverzhi C'hreantel, pe c'hoazh rivin an armerzh brezhon er 17^t kantved, fuadur ar speredoù abaoe ar Grennamzer, ar c'hemm etre 'Breizh-Izel' ha 'Breizh-Uhel' hag enebiezh un darn vat eus poblañs Vreizh ouzh an Emsav etre an daou vrezel-bed. Disol eo eta an tamall a yezhelouriezh a ra hor c'henskriverion da geal an diempuradur.

A-hed ar c'hantvedoù he deus diskouezet ar gevredigezh vrezhon, e nouspet doare disheñvel, ez ae da get enni ar c'hempouezioù hag an ereoù diabarzh he deus ezhomm pep kevredigezh evit bleuniañ. En 12^t kantved en em droc'h ar c'hendereoù-leviañ diouzh ar werin. An troc'h-se a anad n'eo ket hepken er yezh, hogen en holl arvezioù eus ar vuhez prevez pe foran. O pellaat tamm-ha-tamm diouzh ar werin en em stag kendereoù-leviañ Breizh ouzh an estren, Frañs pe Saoz. Boaziañ a reont da welout kreizennoù o spered er-maez eus o bro. N'eus ket da souezhiñ, da heul, e ve kouezhet Breizh e dalc'h an estren p'o doa he levierion, brientinion, tud a Stad ha kefredourion, dilezet o bro hag ar gevredigezh vrezhon. Ret eo merkañ diouzhtu e kaver abred-kenan nerzhoù-ademprañ gwirion o tiwanañ e Breizh. Savidigezh Skol-veur Naoned e 1460 a ziskouez e oa bet komprenet gant un darn eus ar Vrezhoned pegen arvarus e oa fiziout er Skolioù-meur gall pe roman an emell da stummañ kefredourion Vreizh [2].

An diempuradur ne zeu ket bepred a-wel dindan an hevelep stummoù, pell diouzh eno. Hor c'henskriverion a veneg dimp skouerioù disheñvel (100-115). Skouer Frañs, Saoz, Rusia a ziskouez ned eo ket un droug diremed. Fellout a ra dimp pouezañ war un devoud n'o deus ket studierion an diempuradur graet anv anezhañ : n'emañ ket dre ret an diempuradur a-geñver gant ur mestroniadur pe ul levezon estren. Er bed a-vremañ ez anavezomp kevredigezhioù diempret er broioù galloudusañ. Saviad ar re Zu er Stadoù-Unanet a verk un diempuradur grevus er gevredigezh amerikan. Koulskoude re Zu ha re Wenn a gomz an hevelep yezh hag, evit kelo, ned eo ket kouezhet U.S.A. e dalc'h ur vro all.

(94) Boas eur e Breizh, en Emsav pergen, da ober dave da Istor Europa, d'an darvoudoù bras o deus kemmet dremm ar bed,

d'al luskadoù politikel, lennegel, kevredigezhel o deus levezonet pe a levezon buhez hag emdroadur an denelezh. Reizh-kenan eo evit pep den ha pep pobl en em savlec'hiañ er bed ha chom bepred digor da vuhez an dud hag ar pobloù all. Direizh eo avat d'un den pe d'ur bobl klask gant e amezeion diazezoù diogel d'e labour, d'e vuhez ha d'e breder. Padal, dav eo anzav o deus Breizhiz, emsaverion pe get, damantet muioc'h betek-henn ouzh ar pezh a c'hoarveze er-maez eus o bro, - eeun eo an arbenn : n'o deus ket fiziañs a-walc'h enno o-unan; petra vat a c'hallfe dont eus Breizh, eus an Emsav ? An tech-se zo ivez hini hon holl istorourion, 'broadel' pe get. War daolenn Istor Europa o deus klasket pegañ amañ hag ahont bommoù eus Istor Breizh. Mevelion ar C'hallaoued, POCQUET, DURETELLE, REBILLON evit komz eus ar re goshañ hepken, o deus kemeret Istor Frañs da framm diogel ha klenket ennañ Istor Breizh. Lamet o deus al liamm diabarzh a oa etre an darvoudoù c'hoarvezet e Breizh ha dre o stagañ ouzh darvoudoù kempredel gall, graet anezho diskouezadurioù rannvroel eus Istor Frañs. An istorourion vrogar evel LA BORDERIE, DANIO, hag ar re o deus skrivet er bloavezhioù tremenet, o deus kemeret da ziogel ur framm na oa ket bepred ar framm gall, hogen na oa nepred an Emsav nag ar c'hevala istorek amparet gantañ. Gwan bras an holl levrioù Istor Breizh skrivet e brezhoneg pe e galleg gant brogarourion zo bezañ klasket un hent estren d'an Emsav. E derou ar c'hantved e lavared : 'Ar brezhoneg hag ar feiz zo breur ha c'hoar e Breizh' gant ar soñj e c'halle tonkad ar brezhoneg bezañ ispilhet ouzh tonkad ar feiz kristen ha dre-se padout da viken evelti. Seurt deoliezh a guzhe e gwirionez laoskoni tud trec'het mall ganto en em zidamall goude an emgann n'o deus ket bet ar galon da ren. LA BORDERIE en deus diskouezet a-hed e oberoù kalonegezh, kardeded ha haelded hon hendadoù. Evitañ e oa gouroned eus pennoù hor bro peogwir o doa dalc'het bepred d'o enor, ar pezh n'o doa ket graet atav ar C'hallaoued, - ken ma tisoc'h ivez a-benn ar fin gant ar vrizhprederouriezh n'eo ket trec'hiñ a gont hogen mirout an "enor", pezh en deus nebeut a dra da welout gant buhez ar Stad ha prederioù ar politikerezh. Buhez ar Stad, renadur ar politikerezh zo anezho a-raok pep tra un heuliad kudennoù pleustrek da ziskoulmañ er bed fetis, boutin ha pemdeziek. Steuziet eo e Breizh seurt bed fetis a'r politikerezh. Ha setu dres perak ez eas hon istorourion, ha meur a vrogarour d'o heul, da glask un diazez all en tremened, en dazont pe en dreistbed; setu perak e tifourk o Istor Breizh e bed an enor, e bed ar feiz pa n'eo ket e bed ar faltazi. An holl anezho a ra evel pa vije an Emsav ur mennoz hepken a-zivout tonkad Breizh, ar mennoz eztaolet end-eeun gant al levr a skrivont; evel pa ne vije ket eus an Emsav evel nerzh politikel tonket da eilpenañ an traoù er vro, evel derou ur gevredigezh politikel brezhon nevez, hag egin ar galloud riezal brezhon. Ha koulskoude, kaer e vo dezho

klask istorourion Vreizh, n'eus nemet an Emsav a gement a ro dezho an diazez fetis ma loc'hont diwarnañ evit diorren ar bed istorek brezhon.

Ar Vrezhoned o deus d'en em lec'hiañ en Istor, met n'int evit henn ober nemet mar kemeront bezañs istorek er bed; hag an Emsav hepken, dre o lakaat perc'henn war ur c'hevala istorek, a ro dezho an tu da gaout ar vezañs istorek-se. Aes eo evel just en em 'lec'hiañ' dre ar soñj en Istor ar bed; an holl Vrezhoned yaouank a zo er skolioù gall ne reont nemet se. Un asvan a lec'hiadur n'eo ket, - ken aes ha ken difetis-all en em 'lec'hiont' en Istor Sumer pe Egipt faraonel. Istor ar bed, Istor Europa pe Istor Frañs savet gant estrenion da Vreizh zo bepred frouezh kevala istorek an estrenion-se, - diouto ne c'hellomp-ni tennañ nemet hanez. Kement hini a gemer Istor Frañs da ziogel evit studiañ Istor Breizh a zegemer da boell ha da reizh kouezhidigezh Breizh e dalc'h ar riez c'hall. Adal neuze ne c'hell Istor Breizh bezañ evitañ nemet Istor marv ar bobl vrezhon.

N'eus nemet un dra diogel evit ar bobl vrezhon : an Emsav hag ar c'hevala istorek brezhon lakaet en arver gant an Emsav. An Emsav eo an diazez hon eus da gemer evit kompren, n'eo ket hepken Istor Breizh, met Istor Europa hag ar bed. Digoromp ul levr Istor war an Azginivelezh en Italia. Petra eo dimp an Azginivelezh ? Ur strobard darvoudoù etrevroadel luziet, an tremen eus ur bed kravezel d'ur bed "bedel", furmoù nevez en arz hag er sonerezh, buhez Benvenuto CELLINI pe Césare BORGIA ? An Azginivelezh italian ned eo netra evidomp ma n'emañ ket bezant, oberiant, e mod pe vod em buhez a zen a'n 20^t kantved. Evel just, an Azginivelezh zo unan eus ar reverzhioù a zinaou diouti ar bed ma vevomp en 20^t kantved, ha se gouezet dimp pe get : bezant oa an Azginivelezh en hor buhez hag en hon ober a-raok zoken m'hor boe klevet anv anezhi ent hanezel. Dre-se, studi an Azginivelezh n'he deus ster evidomp nemet e kement ha ma'z eo un doare da emouiziekaat ouzh barregezhioù hor buhez. Ne sankomp en tremened gant an hanez nemet evit gallout sankañ en endoniad oberiant hor buhez ha, da heul, gounit mestroni war hon tonkad : bezañ en Istor ha piaouañ ur c'hevala istorek zo un hevelep tra.

An Azginivelezh avat, pe forzh petore parzh all eus Istor ar bed a chom didalvoud dimp ma ne gemer ket hor c'humuniezh perzh war-eeun en Istor : barregezh ur gumuniezh ez eo bepred ar c'hevala istorek pe n'eus ket anezhañ. An diazez nemetañ he deus pobl Vreizh da gemer en Istor eo an Emsav. Neb a venn krouiñ e Breizh er-maez eus an Emsav ne ra nemet pellaat diouzh ar bobl vrezhon. Hogen dre wriziennañ en Emsav e kemer ar Vrezhoned perzh leun e buhez hag e tonkad o fobl hag, en tu all d'o fobl, e buhez hag e tonkad an denelezh. Dre sammañ Istor ar bobl vrezhon e samm an emsaver Istor an denelezh. Evel ma kompren Istor an Emsav hag Istor Breizh e kompren ivez Istor ar bed.

Lavaret hon eus e oa Istor Breizh krouidigezh pemdeziek an Emsav, heñveldra e lavaromp ez eo Istor ar bed, Europa pe Frañs krouidigezh pemdeziek an Emsav ivez. Poell hon ober emsavel eo an Istor. An 'emsaverion' a nac'h an dra-se a anzav, gant rat pe hep rat, ez eo poell un ober estren kreñvoc'h eget poell an ober emsavel ha, da heul, ez int prest da blegañ dezhañ, pa ziskouezont endeo an disfiz o deus ouzh an Emsav. Aze emañ, d'hor meno, arbenn ar glouarded, an amgredoni, ar gilouriezh, an digalon a verzer gant 'emsaverion' 'zo.

Fazi hor c'henskriverion zo klask diazezañ an Emsav war an hanez. Adlennomp ar pezh a embanne Emsav daou vloaz 'zo : 'An hanezour a ra evel pa ne vije ket en Istor, evel pa vije o plavañ a-us dezhañ er-maez eus an amzer' (5/105 1967). Ar sell treamzerel taolet gant an hanezour war an tremened zo hini ar studier oc'h ober ur renabl a zarvoudoù. Seurt trevell avat ned eo nemet ar bazenn gentañ : pa zeu ar studier da vezañ emsaver, e titez ar sell treamzerel evit mont d'an dachenn-emgann, en em eren start ouzh kumuniezh fetis e vro, ha gwirriañ e wriziennadur, - da lavarout eo piaouañ e Istor, n'eo ket ken evel un tremened steuziet en diabell hag e-maez diraez a-grenn, met evel barregezhioù ar bremañ, e-giz ma talc'h ar brezelour e armoù dindan e zorn. Pell diouzh diazezañ an Emsav war an hanez, e talc'h an Istor diazezet war an Emsav. Ne zinac'homp ket ouzh hor c'henskriverion ar gwir da welout an Emsav gant an hevelep daoulagad ha ma welont an darvoudoù tremenet er broioù all hag e Breizh gwechall; dinac'h a reomp outo avat ar c'halloudezh da ren an disterañ ober emsavel war ziazez ar gweladur-se : ur gweladur danzeet e-ser darvoudoù n'eus krog ebet da gaout warno zo ur gweladur ganet dic'halloud, ha ken dic'halloud-all e chom war an darvoudoù dindan grog. Ne reomp rebech ebet d'an hanezourion, lavarout a reomp hepken ez eo ur fazi kemer divizoù politikel diwar ur gweladur hanezel eus an traoù. O hanezelouriezh a rebechomp d'hor c'henskriverion.

An Emsav n'eo ket un diskoulm etre diskoulmoù all da enkadennoù ar bobl vrezhon. An Istor n'eo ket kennebeut un doare e-touez doareoù all da welout heuliad an darvoudoù. Evel ma'z eo an Emsav an diskoulm nemetañ da enkadennoù ar bobl vrezhon, ez eo an Istor ar poell nemetañ o deus an darvoudoù brezhon, europat ha bedel d'en em urzhiañ en ober an Emsav.

En Notennoù evit kelenn an Istor ez eus meneget nebeut a zarvoudoù estren da Vreizh. N'eus ket merket da skouer e oa diempret un darn vat eus ar c'hevredigezhioù europat en 12^t kantved, - en Notennoù Politikel koulskoude (Emsav 25/28,29) e kaver un displegadur berr eus an devoud-se, - ar c'hevredigezhioù gall ha saoz pergen. N'hon eus ket danevellet penaos e voe adempret lod anezho, an div-mañ diwezhañ en o zouez, e-ser an Dispac'hioù Broadel kentañ. A-ratozh n'hon eus ket graet anv eus Istor ar broioù estren, keltiek pe get, ha se

evit troc'hañ gant ar pleg a vez kavet re alies en Emsav hag e Breizh hon eus meneget uheloc'h : an disfiz ouzh diazezoù an Emsav.

(125) "Ent pleustrek" eme hor c'henskriverion "ha hiziv an deiz ez eo kasas rankout anzav - a-hervez - e ve bet gallekaet Breizh adal an 10t, 11t kantved." Ne welomp ket ar spletoù a zo da dennañ o klask kuzhat devoudoù ken anavezet hag an divrezhonekadur. Direizh eo kammañ an hanez war zigarez e c'hallfe enebourion ar vroadelezh vrezhon abegiñ "ez eo diboell 'dic'hallekaat' ur vro a zo bet gall a-viskoazh" (127). N'eus nemet ur respont da ober da enebourion ar vroadelezh vrezhon : diskar ar Stad a ro sol dezho hag a voug ar bobl vrezhon. Anat eo dimp ar perag eus seurt evezhiadenn a-berzh hor c'henskriverion : pa ziazezer an ober war an hanez e vezer techet da balvata an hanez evit e blegañ da ezhommoù an ober. Hogen mard eo tech an hanezelourion kammañ an hanez war zigarez pleustragezh an ober ez eo arouezius ivez eus an doug d'an digalon en em sil ken aes er Vrezhoneg. Y.OLIER en deus barnet reizh, en Avel an Trec'h goude an eil brezel-bed, emzalc'h ar re a gave spletus lavarout gevier war zigarez ma "ne oant ket kreñv a-walc'h".

(129) Lavarout ez eus kement a spered broadel e Reter romanek ar vro hag e lec'h all zo stadañ un devoud na vefe feukus nemet evit ar yezhelourion. En un doare zoken, teodyezhoù brezhonek ar C'hornog zo bet un hual en emgann politikel ha gwiraourel ouzh ar mac'homerezh gall a-raok an Dispac'h Gall. Arabat e ve, forzh penaos, hevelebiñ an teodyezhoù-se hag ar yezh adsavet gant an Emsav : ha pa vent heñvel e-keñver yezhoniezh, ez eus un islonk etrezo e-keñver Istor. Diouzh un tu, truilhoù ar faezhegezh hag an anistor, diouzh an tu all armoù an dieubidigezh hag an distro da gumuniezh ar pobloù. Setu perak e c'haller reiñ an advrezhonekadur evel un azon a adempradur : brezhonek eo an Emsav adempred, hag ar brezhoneg a c'hoari ennañ roll ur benveg galloudus a adempradur.

Pa gomzomp eus Breizh e venegomp holl elfennoù diempred pe get ar gevredigezh vrezhon. Komz a reomp kenkoulz eus ar vrezhonegerion hag eus ar c'hallegerion, eus ar besketaerion hag eus ar gouerion, eus an dornwezhourion hag eus ar vicherourion, eus tud ar c'hêrioù hag eus tud ar maezioù. Ar gevredigezh vrezhon en ur mare eus hec'h Istor zo unvan en tu-hont d'an diskouezadurioù disklotus pe enebek a verzer d'ar c'hentañ sell. Roll an istorour zo kavout ar poell a liamm en amzer an holl ziskouezadurioù-se ha lakaat war wel an nerzhoù a wered enno. N'eo ket war zigarez ma'z eo ar brezhoneg unan eus elfennoù pouezusañ hor c'hevala istorek e tleer tezren ez eo an Emsav ul luskad eus kevredigezh vrezhoneger Kornog ar vro. Bez' e vez an Emsav o tiwanañ eus ar bobl vrezhon a-bezh, - ha ken feleun ma adkaver ennañ tresoù pennañ ar gevredigezh vrezhon gant he ferzhioù mat hag he gwanoù. Souezh ebet eta mar gweler

ennañ tud eus ar Reter romanek evel eus kornioù all ar vro. N'eo ket hepken un emsav divyezhek a zo bet e Breizh betek diwezh an eil brezel-bed hogen, evel ma tiskouez an Notennoù evit kelenn an Istor, daou Emsav e gwirionez : an "Emsav sevenadurel" hag an "Emsav politikel". Tost ur c'hantved en deus lakaet an Emsav da derriñ gwalenn an diempradur ennañ e-unan. Er mare m'o doa c'hoazh un tammig ster an troiennoù "Breizh-Izel" ha "Breizh-Uhel", en doa an Emsav bodet e ser daou rummad distag "politikerion" eus ar Reter ha "brezhonegerion" eus ar C'hornog. Hiziv, en Emsav adempret, emañ unvanet Reteriz ha Kornogiz dre an hevelep kevala istorek hag an hevelep kevredigezh vrezhon nevez.

[1] A-zivout keal an diempradur armerzhel, sl. Emsav 6/154 1967; 19/268 1968. A-zivout an diempradur kevredigezhel e Breizh, sl. Emsav 19/265 1968.

[2] N'emañ ket kont evel-se hiziv gant ar Skolioù-meur a zo e Brest, Naoned ha Roazhon. Ar re-mañ zo a-raok pep tra binvioù a ziempredur hag a arallekadur e Breizh evel ma'z eo a-du-rall an holl skolioù lik pe get e dalc'h ar Stad c'hall. Setu perak ez eo ken pouezus aozadurioù-kelenn an Emsav. Ur skol evel S.A.D.E.D. zo unan eus ar binvioù efedusañ goveliet gant ar Vrezhoned evit adempañ ar gevredigezh vrezhon.

- 150 "Ster ar Chouanerezh e Breizh. [sl. Emsav 26/43]
 "Ar steradur kinniget en Notennoù evit diskleriañ ar Chouanerezh e Breizh a hañval ivez bezañ strizh ha re nac'hus en holl. Da gentañ ne verker ket ez eus bet meur a Chouanerezh e Breizh. Hini ar Roueri, hini Kadoudal pe Sol de Grisolles. Disoñjal a reer ez eo bet degemeret mat gant an holl e Breizh da gentañ mennozioù an Dispac'h Gall; ivez, e oa bet ar Roueri e-unan o stourm en Amerika evit ar mennozioù nevez-se. N'eo ket kredapl kennebeut e selle kouerion Vreizh en em ganne dindan urzhioù an noblañsoù a-enep d'ar Republikaned c'hall, ouzh roue Bro-C'hall evel ouzh un hanterour etre Doue hag ar grouadelezh, ur c'heal kloareg kentoc'h eget ur c'heal poblek e oa henezh.
- 155 Gwelloc'h e vije diskouez ar Chouanerezh, dreist-holl an eil renet gant Jord Kadoudal, evel ur c'hilstourm anienel damheñvel ouzh an hini a voe renet gant rummadoù all a Vrezhoned nevez 'zo a-enep d'an Alamaned. Ne weler ket penaos e c'haller tamall d'ar Vrezhoned bezañ chomet hep stourm evit ar vroadelezh pa ne rae pobl vihan ebet d'an ampoent, nag en Euzkadi nag en Iwerzhon (ho pezet soñj en em gannas Iwerzhoniz ivez evit rouaned estren). Mar asantas ar Vrezhoned d'en em gannañ neuze e voe da gentañ evit
- 170 disteurel ur framm stadel a waske anezho kalz ponneroc'h eget kent o vezañ ma oa bet lamet skramm al ledstad vreizhat (an tailhoù a

175 veze savet war-eeun; deogadurioù a bep seurt a veze sammet war an
 dud; o stuzegezh henvoazel diazezet war ar gravez kristen hag o
 klotañ gant o buhezegezh kouerion a veze dismegañset). Gouez e
 180 oa moarvat ar c'hilstourm-se, hogen arabat eo lavarout n'en doa
 ster breizhat ebet en e zonañ pe en doa ur ster gall hepken e
 framm ar Stad c'hall. Arabat ober eus ar Chouanerezh e nep doare
 ur stourm broadel, - kammamzeriañ ar prantad-se ne rafemp ken, -
 hogen ne ranker ket kennebeut nac'hañ ar pezh a zo breizhat en
 185 emdarzhegezh anezhi. Anat eo ez eus un diforc'h bras etre stourm
 ar vourc'hizion c'hallekaet a-du gant ar Republik c'hall e Breizh
 ha hini ar Chouaned a zifenne hep gouzout dezho ar pezh a chome
 a vrezhon er vro. Ma ne oa ket anezho Brezhoned emskiantek ne oant
 ket aet da C'hallaoued emskiantek evel ar vourc'hizion e Breizh
 d'an hevelep mare." (26 03 69 - 3) EMVR-62

E/EMVR-62.- Abaoe pell eo bet dedennet Breizhiz emskiantek
 gant ar Chouanerezh ha meur a hini en deus klasket he c'hompr-
 en. Evit darn, evel PITRE-CHEVALIER en e La Bretagne Ancienne
 et Moderne, e voe ur stourm brogar, renet gant tud a benn evit
 gwareziñ Breizh diouzh ar Stad c'hall hag an Dispac'h gall.
 Trec'het e vent bet gant un enebour gwidreüs na gile ket rak
 an taolioù trubarderezh. Emgann ar Chouaned a ve bet an hevel-
 ep hini ha stourm ar Breudoù hag ar Stadoù e-pad an emrenerezh.
 An displegadur-se, daoust m'en deus graet berzh e-pad pell, ne
 ro ket da gompren perak ez eas Breizhiz a-viliadoù d'an emgann
 en anv ar roue hag ar feiz hep ober anv eus Breizh. Ne gompren-
 er ket muioc'h emzalc'h ar vourc'hizion pe hini kouerion Leon,
 Treger ha Kornog Kernev na gemerjont ket perzh er Chouanerezh.

A-du omp gant hor c'henskriverion (177) : ne voe ket ar
 Chouanerezh un afer etre Breizh ha Frañs, ne voe ket stourm ur
 gumuniezh vroadel evit he gwir d'an emveli; ned eo ket muioc'h
 da vezañ komprenet evel un darvoud gall (176). Penaos neuze e
 gompren ? Evel ur "c'hilstourm anienel" (163) ouzh ar framm
 stadel nevez (170) ? Mat e ve resisaat ster ar ger "anienel"
 arveret amañ; ha fellout a rafe d'hor c'henskriverion lakaat
 ez eo "anien" Breizhiz bezañ kilstourmerion ? nann moarvat,
 neuze e rankomp lenn en em savent ent emdarzhek (180) ouzh ur
 mac'homerezh ponneroc'h eget kent (170) ? Diaes eo ober eus ar
 Chouanerezh un emsavadeg kouerion heñvel ouzh ar re a reuzias
 da skouer e grez LOUIS 14. Ken diaes-all eo renkañ dindan an
 hevelep skritell "kilstourm" ar Chouanerezh hag ar Résistance
 e Breizh. Anez gwariañ ster ar ger, e talvez "kilstourm"
 stourm ouzh un araokaat, pe da nebeutañ ouzh un emdreiñ emouiz-
 iek. Alouberezh hor bro gant an Alamaned ne voe, pa ouzomp,
 nag un araokaat hag un emdreiñ emouiziek a-berzh Breizhiz :
 Breizhiz n'o doa bet perzh oberiant ebet en emdroadur istorek
 a zisoc'he gant faezhidigezh ar C'hallaoued hag emled an
 impalaeriezh alaman, - gwazed Vreizh oa lod eus pourvezadurioù
 brezel an impalaeriezh c'hall hag en doare-se hepken o doa

perzh en abadenn, perzh anistorek-meurbet ! A-du-rall, ar Vrezhoned engouestlet er Résistance c'hall a voe ken dogan ha soudarded vrezhon Brezel 14, ken dogan hag ar re a zougas dorn da vrezelioù an Trede Reich. Diouzh an tu all bremañ e ranker lavarout e voe an Dispac'h Gall un dispac'h evit Frañs; ster en deus e-keñver Istor Frañs : merkañ a ra trec'h da vat ar vourc'hizion frankizour war ar vrientinion c'hladelour, ar renad gwerinel war ar renad a wir doueel. An Dispac'h Gall avat ne voe ket un dispac'h evit Breizh : ne zisoc'he e nep doare eus Istor ar bobl vrezhon; gwiskadig ar vourc'hizion vreizhat a zigoras an nor d'an dispac'herion c'hall hag ar re-mañ a aloubas Breizh dre an hentoù bet treset gant ar mac'homerezh roueel gall. Diaes eo enta termenañ ar Chouanerezh evel ur c'hilstourm; un heklev d'ar c'hilstourm gall ne voe ken, - un heklev hag ivez ur benveg etre daouarn ar c'hilstourm gall : mar oa "an tron hag an aoter" gerioù-stur ar c'hilstourm-se, ez eur aotreet da soñjal e tifenne ar vrientinion c'hall an tron, maen-bolz o brientoù, da nebeutañ kement ha ma tifennent an aoter a reizhwirie an tron; nemet e tifenne ar Chouaned o feiz kristen muic'h eget ar galloud roueel ha brientinel empleget ganti met gouzañvet ganto evel ur gwaskerezh.

Hor c'henskriverion a verk ez eus bet meur a Chouanerezh : hini ar ROUERI, hini KADOUDAL, hini SOL de GRISOLLES. Ouzhpennañ a rafemp un nebeut anvioù all, rak ar Chouanerezh en deus bet kement a neuz hag a bennoù bezin. Peurliesañ e ranner gourzhhelladurioù ar Chouaned e tri frantad : 1793-1795, 1795-1804, 1804-1815, pep hini disheñvel dre an diskouezadurioù, an emled, ar renerion, h.a.. Hogen bewech e veze stourmet evit breudeur LOUIS 16 ha war o urzhioù. Ar Chouaned, hag int renet gant ar ROUERI, KADOUDAL pe SOL de GRISOLLES, a oa soudarded a-youl-vat an danvez roueed diriez-se. Lavarout (156) en doa ar ROUERI stourmet en Amerika evit mennozioù an Dispac'h Gall zo ankouaat un tammig buan e oa, evel kalz eus e genvroidi, soudard e lu ar Stad c'hall. Gant ar Stad c'hall e oa bet kaset da Amerika evit mad ar Stad c'hall. Evel nouspet soudard brezhon, mard eo bet kalonek ha dispont er brezel, ne welas ket ne c'haller ket war un dro doue kleze ar galloud sujer ha labourat evit ar vro sujet : diskouezet en deus ar galonegezh vrasañ en emgannoù armet hag an dallentez washañ er vuhez politikel.

N'eus puez istorel ebet gant ar stadadenn hanezel (155) "ez eo bet degemeret mat gant an holl, da gentañ, mennozioù an Dispac'h gall". Istorourion youlet mat o deus klasket lakaat da gredañ e oa bet Breizhiz a-du gant an Dispac'h Gall betek ma "troas fall" hemañ. Mar loc'has an Dispac'h gall diwar ar reuzioù gwadek c'hoarvezet e Breizh e 1788, mar boe deuet mat, en hañv 1789, diferadennoù kentañ an Assemblée Nationale, n'eo ket da lavarout e voe degemeret mennozioù an Dispac'h gall e Breizh. Ar re-mañ a chomas estren a-grenn en

o istoregezh d'an holl Vrezhoned, pe e savfent a-du pe e savfent a-enep. Adlavarout a reomp : frouezh emdroadur ar gevredigezh c'hall eo bet an Dispac'h Gall hag un dispac'h gwirion ez eo bet peogwir en deus krouet ur gevredigezh nevez o tegemerout da sol ar pennaennoù trabedel o doa e lusket. Ne c'halle ket bezañ un dispac'h evit Breizhiz peogwir e chome estren rik d'ar bobl vrezhon end-eeun ar pennaennoù trabedel-se. Kement-mañ hon laka da gompren penaos e voe buhez an Dispac'h Gall gant ar bobl vrezhon evel ur stroñsadenñ griz he sankas donoc'h c'hoazh en hec'h arallekadur : displeberañ ha diempañ a reas mui-ouzh-mui ar gevredigezh vrezhon a-hed an Dispac'h Gall. Un dispac'h brezhon ne c'hell bezañ nemet un emsav emouiziek eus pobl Vreizh e-maez a bep deluskerezh estren.

Er c'heñver-se ez eus un devoud ha n'hon eus ket pouezet a-walc'h warnañ : nesoc'h edo an enepdispac'herion c'hall d'an dispac'herion eget na oant d'ar Chouaned. Intret-mat e oa an noblañs c'hall gant mennoziou ar Filozoferion ha pell 'zo he doa distaolet eus he spered meizadur un urzh doueel eus ar rouantelezh : ur furmelezh ne oa ken dezhi ar meizadur-se, hag unan c'hounidus pa roe reizhwir d'he brientoù. Evit pobl Vreizh avat ne oa ket echu ar Grennamzer : tra m'edo dispac'herion ha brientinion o klozañ an Oadvezh Modern dre o emgann, edo-hi c'hoazh diazezet ent werc'hel, n'eo ket ent furmel, er vedouriezh kravezel n'o doa tizhet nag an Azginivelezh, nag an Dispac'h Broadel kentañ, nag an Adreizhadur, nag ar Filozoferion : evit ar Chouaned, an tron hag an aoter a oa "breur ha c'hoar", - ha seul aesoc'h a se e c'hallas an noblañs c'hall o arverañ da zifenn he brientoù.

Setu perak e kredomp e fell d'hor c'henskriverion ober fent pa lavaront (157) : "N'eo ket krebañ e selle kouerion Vreizh () ouzh roue Bro-C'hall evel ouzh un hanterour etre Doue hag e grouadelezh". An devoud hon eus meneget, lec'h dibarek ar roue er vedouriezh hengounel, zo anavezet-mat ha studiet aketus abaoe ur c'hantved gant ar gevredadourion, ar gravezourion, ar brederourion, ar gevrinourion, an doueoniourion hag an istorourion. Unan eus ar patromoù a zo bet bev e hengoun pep pobl ez eus amañ. An hanterour etre an neñv hag an douar eo ar ri, an "den gwirion". Eñ eo a unan an douar hag an neñv, pe evit kemer an termennoù kristen, Doue hag e grouadelezh. Diniver eo ar skouerioù a verk anat lec'h nevet an tiern hag e roll hanterour. An unpenniezh kravezel he deus bleuniet en Europa betek an Dispac'h Gall zo frouezh ar vedouriezh-se. Moarvat ez eas war c'houlloñ mui-ouzh-mui e-doug an Oadvezh Modern seurt meizadur hengounel betek bezañ un ideologiezh hepken. Gant Breizhiz avat, chomet er-maez eus istoregezh an Oadvezh Modern, ne bellaas ket nemeur ar vedouriezh-se diouzh he furm grennamzerel. Kement-se ned eo lavarout e oa ezipleg-kaer en o meiz damkaniezh an doueleuriadelezh ! Empleg-kreñv en o buhez ne lavaromp ket : evit muzuliañ pegen start e oant gwriziennet

e sol kravezel ar Renad Kozh, n'eus nemet kounaat an entan a verzherion o bounte d'an emgann ha d'ar marv en anv ur roue o rivine dindan wask e delloù hag e wazourion.

N'eo ket gwirheñvel en em savas ar Chouaned "evit disteurel ur framm stadel a waske anezho" (170) dre an arbenn eeun ma renas ar vrasañ dizurzh a-hed ar prantad dispac'hel hag en doa ar gouarnamant gall ar brasañ diaesterioù evit lakaat erounit e zisentezioù. Abeg o dije bet kentoc'h Breizhiz d'en em sevel evit lakaat un tamm urzh en o bro. Mar en em savas ar Chouaned ne voe na dre an eil abeg na dre egile. Fellout a rae diskar ar pezh a lakae diazezoù o bed en argoll hag evit difenn ar bed ma kavent Doue e oant prest da vervel. E-se emichañs ez int ur skouer. Diaes eo avat lakaat e tifennent "hep gouzout dezho ar pezh a chome a vrezhon er vro" (183). Hag e tleomp kompren ez eo aet da get gant an Dispac'h Gall "ar pezh a chome a vrezhon er vro", o yezañ ma voe faezhet razh ar Chouaned ? E gwir, kondaonët'e oa pell 'zo ar Vreizh krennamzerel difennet ganto hag al ledstad vreizhat a oa un darn anezhi, - meneget e voe gwirioù Breizh gant ar ROUERI en e c'halvadenn vrudet. Kement-se a ziskouez ne oa ket gwall "vreizhat" emsavadeg ar Chouaned. Ne oa ket emsavel dreist-holl. Rak ken "breizhat" e voe e gwirionez hag emzalc'h ar Vrezhoned all : kavout a rejont gwelloc'h kilañ en anistor eget digeriñ un Istor nevez hag ur bed nevez da Vreizh. Ha pa ne zigor ket ur bobl ar bed dirazi e rank mont er bed digoret gant unan all. Ar bed-se avat e-lec'h digeriñ dirazi, a zigor dindan he zreid.

Degas skouer Euzkariz hag Iwerzhoniz evit proufiñ ne oa ket ar Chouaned da vezañ un emsav brezhon gwirion zo gortoz kalz eus ar poellata dre heñvelaat. Perak dres dibab ar c'hwitadennoù pa c'haller ken aes-all diskouez roll niverus ar pobloù o deus ken abred hag ar 16^t kantved ha betek hiziv en em zieub-et ha savet riezoù ? Diforc'het eo bet gant Emsav c'hoazh an daou seurt stourmoù a c'hoarvez er pobloù suj : an emsavioù, krouerion dazont, digorourion bedoù, ha stourmoù an tremened, faezhet bepred (sl. Emsav 22/293).

"Istor an Emsav. [sl. Emsav 26/44]

190 "Ne ze zranner ket mat en Notennoù orinoù ha gwriziennoù an Emsav, dreist-holl re an Emsav sevenadurel. E gwirionez ez eo emdroet a-ziforc'h an emsavioù politikel ha sevenadurel. Ret eo layarout a-hend-all n'eo ket emdroet an Emsav breizhat dioutañ e-unan war-du ar vroadelouriezh.

195 "Daou boent n'int ket bet resizet en Notennoù. Da gentañ, levezon an emsav sevenadurel kembreat e derou ar c'hantved. Un deiziad pe veur a zeiziad zoken a ranke bezañ meneget : hini an adsav lennegel e 1898 (kv. Eñvorennoù TALDIR) ha 1905, diazevadur ar Bleun Brug diwar skouer an Eisteddfod. Ar mennad a adsevel hag a ziorren ar yezh zo diwanet e Breizh diwar zelanvad Kembre he doa

200 neuze ur vuhez yezhel ha lennegel poblek kalz birvidikoc'h eget Breizh. Er c'heñver-se e ve mat studiañ oberenn ha labour TALDIR e derou ar c'hantved. Arabat eo disoñjal en doa VALLEE desket mat ar c'hembraeg ivez hag e roe kement a bouez d'an darempredoù etrekeltiek ma ouestlas teir levrennad a eñvorennoù d'ar beajoù a reas er broioù keltiek.

205 "An Emsav politikel broadel e Breizh n'eo ket bet kennebeut frouezh un emdroadur enbroel. Savet eo bet ar Strollad Broadel kentañ diwar levezon an emsav broadel iwerzhonat ha gwirheñvel eo ne vefe ket bet ganet ken abred-all un emsav broadel e Breizh ma ne vije ket bet a-ziaraok un emsav broadel en Iwerzhon. Nac'h-añ kement-se zo ankouaat roll L.N.LE ROUX e savidigezh ar Strollad Broadel kentañ. Pa zivizo hemañ divroañ e 1914 e kavo repu

210 e-pad ur mare en Iwerzhon end-eeun.

215 "Moarvat ez emdroio an emsav hengounel e-unan, - hini L'EST-OURBEILLON, - da heul ar Strollad Broadel, hogen n'eo bet ganet e nep doare an Emsav nevez diouzh an emsav kozh. Un torradur pe, mar karit, ur c'hemmadur zo c'hoarvezet neuze en Istor ar vro hag an Emsav.

220 "Petra klozañ ? Kement-mañ, d'hor soñj. Breizh ne vev ket en un "digenvez splann". Hec'h Istor ne c'hell bezañ komprenet nemet e framm Istor Kornogeuropa pe en hini ar broioù keltiek. Meneget hon eus levezon Kembre hag Iwerzhon war vBreizh. Arabat e vefe ankounac'haat evit kelo-se levezon Breizh war gKembre : Breiz Atao eo a zevoudas savidigezh Plaid Cymru. Warc'hoazh e c'hell al levezon-se bezañ kreñvoc'h ha donoc'h er broioù keltiek all end-eeun. Youenn OLIER en doa merket an dra-se end-eeun gwechall

225 en ur pennad embannet war An Avel e-lec'h ma lavare e oa bet Istor Breizh a-viskoazh kalz mui europat eget breizhat. Anzav kement-se n'eo ket tamm ebet nac'hañ dibarelezh hor sevenadur hogen gouzout er c'hontrol ez eo tonket dezhañ mar fell dezhañ ober berzh kaout ul leurenn kalz ledanoc'h eget Breizh end-eeun."

(26 03 69 - 4)

EMVR-63

E/EMVR-63.- Lakaat gwrizioù an Emsav sevenadurel e Kembre ha re an Emsav politikel en Iwerzhon zo kemer da wir tezenn ar Stad c'hall a lavar n'eus netra brezhon en Emsav. Koulskoude n'eo ket aze emañ fazi hor c'henskriverion. Diazez an Emsav zo e kevala istorek ar bobl vrezhon hag er pezh a grou bemdez an emsaverion dre ar c'hevala-se. Nac'h kement-mañ zo degemerout n'en deus an Emsav netra da welout gant ar bobl vrezhon. Nac'h kemer ar c'hevala istorek brezhon da ziazez hol labour zo mont war un hent dall evel ma'z eo aet kalz a Vrezhoned o taneal Kembreiz pe Iwerzhoniz. Diniver eo ar c'hwitadennoù a zo bet e Breizh gant al luskadoù a glaskas drevezañ ar c'h-Gorsedd kembreat, an I.R.A. iwerzhonat, an Eisteddfod kembreat, an F.L.N. aljeriat, h.a.. Evel ma né oufe heklev un emsav-dieubiñ estren talvout da emsav-dieubiñ evit Breizh, ne c'hell ket muioc'h drevezadenn ul luskad sevenadurel estren reiñ ur

sevenadur brezhon.

An Emsav sevenadurel kentañ zo disoc'het eus labour remziadoù a yezhadurourion, a c'heriadurourion, a werinonourion, a skrivagnerion, a arzourion hag a grouerion o deus labourer e Breizh abaoe an amzerioù koshañ. Petore danvez a gemerjont d'o labour ? Danvez Breizh moarvat, poblek ha gouiziek, met ivez danvezioù a bep bro hag a bep orin. An hevelep tra evit an Emsav politikel : e pep remziad abaoe kantvedoù e sav tud e Breizh evit gouestlañ o nerzhoù holl hag o buhez a-bezh d'an emgann broadel. Brezelourion ha levierion ar Grennamzer, gwiraourion, politikourion hag istorourion an Oadvezh Modern, emsaverion ha brezelourion an amzer gempredel o deus holl tennet o mad eus ar skiant hag ar pleustroù politikel a rene en o mare, gouezet o deus dibab ar skouerioù a welent er broioù all ha dibabet ivez al levezonioù a zlee c'hoari warno. N'eus torr ebet, en enep d'ar pezh a lavar hor c'henskriverion (214), etre ar Strollad Broadel kentañ diazezet e 1911 hag ar strolladoù rannvroelour a oa bet araozañ. Tud eus an hevelep kendereoù ne oa ket enno marteze (noblañsel e voe dreist-holl an emsav rannvroel kozh, ha bihanvourc'hizel an emsav broadel kentañ) met a dra sur, en holl anezho e kendalc'he an hevelep damant d'an emrenerezh brezhon a oa bet hini gwiraourion ha politikerion an 18^t kantved. Ken gwir eo ma kouezhas ar vroadelourion gentañ e fazioù ar rannvroelourion gozh. Ar rannvroelourion a venne, evit a bep seurt abegoù, daskoriñ da Vreizh an dezvad he doa bet e-pad an Emrenerezh. Ar Strollad Broadel kentañ a ginnige disrannañ Breizh diouzh Frañs evit adkavout Breizh an Duged. Nag an eil nag ar re all ne gomprenent e oa ur vro nevez da sevel en holl d'an holl hag ur gevredigezh da adempañ; evit an holl e c'halle Breizh lammat er bed evel m'edo ken yac'h ha tra : ne oa d'ober nemet mirout ar pezh a oa "breizhat" ha mat enta, ha lemel ar pezh a oa gall ha fall dre-se.

Abegadennoù hor c'henskriverion a dremen e-biou d'ar pep pouezusañ : gwir natur an Emsav. Kemer a reont ar rusk evit an derc'h : o zech hanezelour o laka da welout diskouezadurioù an Emsav evel devoudet eus an diavaez bepred. Dont a ra an emsav sevenadurel eus Kembre, hag an emsav politikel eus Iwerzhon; n'eus liamm ebet etre prantadoù an emsav politikel, - ur burzhud eo a-benn ar fin ez eus bet bepred un deus ex machina o tont a-vaez bro da adluskañ e koulz ar paour kaezh Emsav brezhon ! Nann. Gwir natur an Emsav eo bezañ ul lec'h-divizout, ul lec'h-dibab, ul lec'h-krouiñ. Anez bezañ se, ned eo an Emsav netra.

Anat eo emañ Breizh evel pep pobl e-kreiz ur vaezienn a levezonoù liesseurt. Azon an anistor eo avat e c'hoarife al levezonoù-se ganti evel gant un danvez marv; azon ar brizh-emsaverezh eo ne oufe ar vrogarourion vrezhon tennañ eus al levezonoù emsavel estren a c'houzañvont nemet marmouzerzh

e-maez buhez. Anavezet e vez an Emsav diouzh ma'z a al levezonioù d'ober kevala gantañ. An Emsav a gemer diouzh e ezhommoù ar pezh en deus ezhomm evit bevañ, krouiñ ha kreskiñ. Kavet en deus Kembre er mare-mañ-mare ha LENIN en ur mare all; lavaromp trugarez vras da gKembre ha da LENIN, evit an Emsav hag evit e hanezourion a gavo aze an tu da gontañ traoù burzhudus war orin protestant ha bolchevik Breizh nevez; lavaromp ivez, dinec'h-kaer, ma ne vije ket bet eus Kembre pe eus LENIN, en dije an Emsav tennet e vad eus broioù hag eus tud all. War roll ar burchaserion kevala e c'hellomp lakaat kement sevenadur, kement pobl ha kement luskad politikel a zo er bed kempredel ha tremenet. Plijet pe get, ez eo Frañs hor brasañ pourchaser er mare-mañ, ha pa ve en arbenn eus ar sanailhad ramzel sanket ennomp gant ar skolioù gall. N'eus ket da vezañ mantret gant ar saviad-se avat, - gant ma ne bado ket re, - rak, evel ma lavar an Aviel : "Kement a zebromp a ziskenn er c'hof ha goude-se er c'haoc'hlec'h". Evit ober kempouez avat ez eo mat d'an Emsav treiñ e zorioù war-du pourchaserion all; hag a-du e savomp gant hor c'henskriverion, ha gant Roparz HEMON ha Youenn OLIER araozo, evit menegiñ er renk kentañ Kembre hag Iwerzhon. Souezhus eo a-hend-all ar gensturieghez a zo etre darvoudoù Istor ar broioù keltiek, etre Istorioù Breizh ha Kembre pergen. Seurt kensturieghez zo hep mar ampegad an eskemmoù a ra etrezo an div vro, - met an eskemmoù-se n'o deus ur ster nemet e kement ha ma'z eus e Breizh hag e Kembre lec'hioù-krouiñ gwirion evit kenderc'hañ diwar an danvezioù eskemmet.

A-bouez eo kompren n'hon eus ket da "lec'hiañ" Breizh pe an Emsav e-keñver ar broioù keltiek, Europa pe ar bed. Da gavout hon eus dre an Emsav, dre an Istor a reomp, dre al lec'h-seveniñ ez omp, Istor ha sevenadur ar broioù all; bez' hon eus da adkavout ar bed evel m'hon eus da adkavout Breizh, dre o lec'hiañ en Emsav.

Na welomp ket aze ur reolenn a zivezouriezh met ur redi politikel. An emsaver ne gompren Istor ar bed nemet dre gompren da gantañ e Istor dezhañ, Istor an Emsav hag Istor Breizh. Ul lec'h a rezid eo an Emsav. Ne vez ket komprenet dre e hanez; danevellañ degouezhioù e greskidigezh ne zispleg ket perak ez eus anezhañ ha petra ez eo. N'eus nemet un hent d'e gompren : kemer diazez warnañ hag adkrouiñ ar bed gantañ. An hent kontrol zo hent an difeiz hag an disfiz : an hini a ya gantañ, o klask adkrouiñ an Emsav o kemer diazez war hanez ar broioù all ha war skouer an emsavioù all, en em gav dirak an Emsav a-benn ar fin evel an divroad n'en deus ket paouezet a vezañ dirak an hanezioù estren; aze emañ an dro da gomz eus an "digenvez splann" a ra hor c'henskriverion anv anezhañ !

"Tro am eus bet da gomz gant A eus stad an traoù en hon touez. Anat eo din e klask eñ hag e gellig, hag ivez e adkellig, jestroù eeun an emzalc'h emsavel. Em adkellig eo disheñvel moarvat : an dud zo dre vras koshoc'h. Ne hañvalont ket kaout ezhomm eus oberoù nevez daoust ma anad mui ouzh mui dezho e c'houlenn an Emsav kemer o buhez a-bezh.

"Marteze e tostaomp d'ar gudenn o studiañ a-dost an doare ma vez meizet ha buhezet kevredigezh an Emsav gant an emsaverion hag an danvez emsaverion. Lavaret en deus B an deiz all e oa nebeut-tre a dud o doa dibabet an Emsav e gwirionez. Gwir eo moarvat, daoust ma ne c'haller ket kas betek ar penn seurt poellatadenn : "Ur vicher am eus a gemer re a amzer diganin, hogen ne'm eus nemet ar vicher-se. Ar pezh a c'hallan ober eo krennañ kement ha ma c'hallan war an amzer hag ar preder a ouestlan dezhi". Merzet em eus alies en em gave an emsaverion evel ur berad eoul war ul lenn dour. Ar berad eoul zo kevredigezh an Emsav, al lenn dour ar gevredigezh c'hallekaet a zo da ziskar. N'hon eus ket merkoù niverus pe helavar a-walc'h eus ar stourm a zo etre an div gevredigezh.

"A-benn ar fin n'hon eus nemet un dra boutin etrezomp, pe gentoc'h an dra a zo boutin d'an holl eo hemañ : dibabet hon eus ar gevredigezh vrezhon. Merkoù pemdeziek an dibab-se hon eus da gavout. Hon ober ne dle nepred sellout hepken ouzh an Emsav evel ouzh ur gevredigezh a gresk tamm-ha-tamm dre an tuta, en em framm tamm-ha-tamm ivez. Arabat disoñjal ar gevredigezh c'hallekaet a zo da zistruj hag ar framm gall da ziskar.

"Ar stourm etre an div gevredigezh zo buhezet gant an holl emsaverion, en ur mare pe unan all eus o buhez. Ar stourm-se a chom enno, ned a ket war an dachenn foran. Ent fetis ne vez ket gwelet emsaverion o kannañ frañskilhoned ! War holl dachenoù ar vuhez kevredigezhel e tle an Emsav enebiñ ha stourm ouzh ar gevredigezh c'hallekaet. Mar anavezomp ar stourm-se ne ouzomp ket penaos tennañ hor mad dioutañ. Kemer a ran ur skouer : eus ar gelennadurezh hon eus savet abaoe un nebeut bloavezhioù, n'hon eus ket gouezet ober armoù. Tu a ve, da skouer, da dreiñ e galleg arroudoù 'zo eus Emsav ha lakaat an danvez emsaverion hag ar re all d'o adskrivañ war follennoù bras ha mont da begañ se e kêr hag el lec'hioù kevannez." (27 03 69) EMVR-64

5 "A-du emañ ganeoc'h pa lavarit ne c'hell bezañ a vrezhoneg er-maez eus ur gevredigezh vrezhonek. Aner eo kelenn ar yezh hep spered broadel, anat. Gwall zispis eo koulskoude ar vevenn etre "difreterezh yezhelour" hag "argerzh an dispac'h", - pa'z eo gwir ned eo ket an Emsav diogeladurioù, met "ur c'horf a oberoù" (sl. Emsav, Penaos anaout an Emsav war an dachenn ? 7/168). Setu amañ ur skouer ma kaver an daou emzalc'h en ur gichen : degouezh Skolveur Roazhon an hini eo.

"Abaoe un nebeut sizhunvezhioù emañ ar studierion war ar

- 10 "c'heltieg" oc'h ober o zamm reuz er Skol-veur. Hervez ar skrit-elloù o deus skignet hag ar pennadoù o deus kaset d'ar wask e c'houlennont ma vo roet d'ar brezhoneg ul lec'h dereat en o studioù ha ma vo anavezet da vat "gwirioù sevenadurel ar bobl vrezhon". Droch eo goulenn kement-se ouzh ar Stad c'hall evel just, pa na
- 15 ve ken dre ma'z eo bet graet reoliek hag en aner abaoe 1870. Ar brezhoneg er skol, da lavarout eo er skolioù gall, er framm gall, eleze en ur Vreizh c'hall ha galleger, ned eo ket hor pal, anat. Mui-ouzh-mui avat ez eus tud yaouank, er skolioù-etre koulz hag er skolioù-meur, o c'houlenn ma vo kelennet brezhoneg dezho. An
- 20 Emsav, diouzh e du, ned eo ket gouest c'hoazh da respont dezho holl; kaer en devo ober a-hend-all : atav e vo kavet tud da gelenenn brezhoneg er skolioù gall, forzh pegen dister al lodenn roet d'ar yezh. Evel-se emañ evit ar poent. Penaos en em ren war an dachenn enta - e seurt doare ma ned afe ket an holl danvez
- 25 emsaverion-se d'en em goll el ledemsavioù pe er framm gall ? Tu zo da implijout ar framm gall er c'heñver-se emichañs.
- "Setu un nebeut devoudoù : da heul darvoudoù miz Mae e oa bet distardet un tamm framm ar studioù er skolioù-meur gall, ken e krede da gelennerion ha da studierion 'zo e vefe tu, a-benn ar
- 30 fin ha dre forzh en em zifretañ, da c'hounit un aotreegezh-kelenn war ar brezhoneg. Bremañ avat eo krog ar Stad c'hall da startaat ar framm en-dro. Abaoe derou ar bloavezh-skol e oa ur c'hant studier bennak o pleustriñ war ar yezh; mui-ouzh-mui e klask ar Skol-veur (kelennerion hag amaezhidi) pouezañ warno evit ma tilez-
- 35 fent seurt studioù ("soñjit en ho micher da zont"...). Setu perak o deus ar studierion klasket en em zifenn : savet o deus ur C.A. (Kuzul-Oberiañ) - evel ma'z eo ar c'hiz bremañ - a zo e bal lakaat an holl studierion da emouezañ ouzh gwaskerezh ar Stad c'hall, h.a..
- 40 "Mar stourmont e-giz-se ez eo emichañs dre ma klaskont tennañ traoùigoù digant ar Stad c'hall. Kempennourion int. Notomp koulskoude e nac'hont groñs difenn ar brezhoneg evitañ e-unan ha stourm evit ar yezh er-maez eus pep politikerezh.
- "Hogen mard eo politikel o emzalc'h ez int gwall nec'het mem-
- 45 estra : luziet-kenan eo c'hoazh o mennozioù war ar yezh koulz ha war ar politikerezh. N'eo ket souezh e gwirionez : lod o doa bet darempredoù gant al ledemsavioù, lod all n'o doa ket; ar wech kentañ eo dezho, forzh penaos, kejañ ez-eeun gant an Emsav, da lavarout eo gant an dornadig emsaverion - hag int amstummet
- 50 peurvuañ - a zo er Skol-veur.
- "Evit ar poent emaint c'hoazh o tastornañ. Diouzh al labour o deus boulc'het ha diouzh ar mennozioù o ren en o mesk e c'haller dezastum kement-mañ :
- "- daoust d'o difreterezh (gwall abaf int c'hoazh, ken e reont
- 55 atav anv a "gadoniezh" evit digareziñ o gwander) ha daoust ma'z eo luziet a-walc'h o mennozioù, e klaskont lakaat ar studierion da emouezañ ouzh ar wir gudenn ha da ober un dra bennak. Fazioù a vez graet, sur a-walc'h; souezhus eo gwelout evelato pegen buan

60 ez eo tostaet an dud ouzh an Emsav en ur ober daou viz, lakaomp, hag hep skoazell digantañ, koulz lavarout. Dre ar pleustr ha dre brederiañ un disterañ o deus dizarbennet ar mennoziou rannvroelour, war a seblant;

65 "- war un dro e klaskont arverañ nac'hadennoù ar Stad c'hall da ober bruderezh a-enep dezhi. Pouezus eo; hogen ne c'haller implijout seurt doareoù nemet pa c'houlenner un dra bennak.

70 "Setu. Un degouezh bihan ha dibar eo hag a vo berrbad marteze. N'eus ket anv evel just a zifenn ar brezhoneg er framm gall - a enkañ Breizh nevez er framm gall; hogen talvoudus e c'hell bezañ traoù e-giz ar C.A., ken e-keñver bruderezh, ken evit kregiñ da vreinañ ar framm gall - en ur ziskouez anezhañ gant e zremm wirion...

75 "D'an Emsav da c'houzout ar mad a c'hallfe tennañ eus degouezhioù a-seurt gant hemañ, rak reoù all a vezo, bezomp dinec'h. Dezhañ da zegas poell en o obererezhioù koulz hag en o mennoziou. Kement-se avat a c'houlenn ma'z afe an Emsav war an dachenn buan a-walc'h - buanoc'h eget na c'hell marteze." (28 03 69) EMVR-65

E/EMVR-65.- Degouezhet eo al lizher-mañ gant Emsav da heul ar pennad Dremm dispac'hel ar brezhoneg, 27/69. Un alberz a ro eus ar c'hudennoù o deus ar studierion da ziskoulmañ war o zachenn. Goulenn a ra hor c'henskriver (75) "ma'z afe an Emsav war an dachenn buan a-walc'h", ar pezh a zo da gompren : "Kasit dimp an armoù ret evit ren an ober emsavel el lec'h m'emaomp". Emsav ned eo ket ur c'hKengor an Diavaez ha n'he deus ket disentezioù da gemer evit a sell an ober da ren ent dibarek. He roll eo avat labourat war zezrannadur ar saviadoù, hag en amboaz-se e roomp amañ hon evezhiadennoù.

Da gentañ e stagimp gant ur gudenn a hentenouriezh. Fellout a ra d'hor c'henskriver, evit dezrannañ saviad ar studierion vrezhon er skolioù gall, loc'hañ diwar un termenadur eus an Emsav roet gant Emsav daou vloaz 'zo : an Emsav zo ur c'horf a oberoù (5). D'hor meno ned eo ket dreistezhomm stigmañ amañ kudennadur termenerezh an Emsav.

Evel pep boud istorek fetis ne c'hell ket an Emsav bezañ enklozet en un termenadur digemm. N'eur ket evit tremen hep e dermenañ avat : dav eo neuze kas dizehan ul labour termenañ ha kavout evit pep prantad nevez eus e Istor ha da geñver pep argerzh eus e hanvoud an termenadur reizh, - o c'houzout ervat ez eo al labour termenañ-se, ouzhpenn un deskrivañ, ur parzh oberiant en argerzh termenet. Ereet eo da skouer an termenadur "korf a oberoù" ouzh ar prantad-prientiñ ma rank an Emsav en em savlec'hiañ e-keñver Istor ha, da heul, savlec'hiañ en e geñver an obererezhioù renet e Breizh. Termenadurioù all a c'haller menegiñ : an Emsav evel framm, evel rakstad, evel kevredigezh nevez, h.a., pep hini ereet ouzh ur argerzh disheñvel eus hanvoud an Emsav. Disheñvel, a-wechoù enebek eo an termenadurioù-se ha ne c'hellont ket bezañ dezreet an eil

eus egile; n'eo ket e vefent digempoell : ur poell boutin zo dezho er c'hontrol, met n'eo ket unan anavezadus dre ar reiz plaen, peogwir ez eo poell an Emsav e-unan, da lavarout eo ur poell istorek evel m'hon eus bet tro da ziskouez c'hoazh meur a wech. Ereet en doare-se ouzh ar re all diwar-bouez istoreg-ezh an Emsav e chom gwiriek pep termenadur evel just, nemet an holl n'int ket talvoudek e pep degouezh. Hag amañ, e degouezh ar studierion er skolioù gall, ne hañval ket an termenadur "korf a oberoù" dereout. Rak ar saviad e kaoz a ampleg ma ve echu an argerzh-prientiñ ez eo an termenadur-se ur parzh anezhañ.

Ur saviad dislavarus eo hini ar studierion vrezhon er skolioù-meur gall. O roll zo bezañ er framm brezhon a rank distrujañ hag erlec'hiañ ar framm sujer e Breizh, ha rediet int dre stad an traoù da vezañ war un dro er framm sujer ha d'e greñvaat ha pa vefe dre o bezañs hag o labour personel ennañ. Tentet eo reoù 'zo da dec'hout diouzh an dislavar-se. Kuitaat ar Skol-veur c'hall ? Forzh pelec'h ma'z afent e Breizh e kavfent an hevelep dislavar dindan furmoù all : dalc'het eo ar vro a-bezh gant ar framm sujer ha pobl Vreizh a-bezh zo paket e-barzh. Un tentadur eo en em zallañ war bezoud an dislavar e-unan : hunvreal e vo aloubet Skol-veur Roazhon ha re Brest ha Naoned ha dalc'het un deiz gant an emsaverion ha kement-se dre c'hoari gant ar gwikefreoù amaezhel gall; an hunvre-se a empleg e ve mestroniet ivez gant Breizhiz kement gwikefre arveret gant ar galloud sujer evit derc'hel an deskadurezh e Breizh etre e zaouarn, da lavarout eo e ve mestroniet gant Breizhiz ar framm gall a-bezh e Breizh, - ar pezh a zo kement ha krediñ e paker al laboused o lakaat ur c'hreunenn holen war o lost. Un tentadur all c'hoazh eo nac'h an dislavar dre zianaout an Emsav. Ar senario aze ne vez ket c'hoari e par an hunvre met e par an emsotaat. An emziviz-mañ a glever tost da vat : Emsaver 1 : "Breizhiz a-hiniannoù ne c'hellont ober netra a-enep d'ar framm gall; ret eo dezho kaout ur framm da ren an dispac'h". Emsaver 2 : "Me ne bledan ket gant ar politikerezh, met gant ar sevenadur. Te oar ez eus bremañ e Skol-veur Roazhon n kelenner a-du gant an Emsav, hag oc'h ober gant ar zh ? An traoù a ya war-raok, me 'lar dit. Ni zo pell diouzh amzer ar c'hozh Falc'hun !". Seurt emdremen da sot zo peurliesañ un doare d'ober ar peoc'h e kuzh gant an enebour, treuz-tec'hadenn oc'h echuiñ peurliesañ e kroc'hen ur bourc'hiz-breton-mat milliger ar Stad evel pep Français-moyen.

Emañ tal-ouzh-tal ar framm brezhon hag ar framm gall, o lakaat an dislavar e Breizh. Nac'h an dislavar-se, tec'hout dioutañ zo nac'h an Emsav, tec'hout diouzh an Emsav. Anaout a reer an emsaver dre ma samm an dislavar-se ha dre ma labour d'e gas betek e boent-tarzhañ a vo freuzadur ar framm gall ha peurziavezadur ar framm brezhon. Goulenn a reer moarvat perak ez eo ken bihan c'hoazh ar framm brezhon ha perak e chom dianat

an tennder etrezañ hag ar framm gall. Eeun eo ar respont : peogwir ez eo distank c'hoazh ar Vrezhoned o deus sammet da vat, ent emouiziek hag ent werc'hek, an dislavar etre ar framm sujer hag ar framm dieuber. Padal, n'eus nemet an hent-se a oufe kreñvaat ar framm brezhon ha, war un dro, dinerzhañ ar framm gall.

Petra eo sammañ an dislavar etre framm brezhon ha framm gall evit studierion vrezhon ar skolioù gall ? Ar framm gall evito zo an deskadurezh vroadel c'hall; a-dal dezhañ emañ framm an deskadurezh vroadel vrezhon. Kentañ poent : mar emaint, en arbenn eus o bara, o labourat en deskadurezh c'hall, o dlead groñs eo labourat startoc'h c'hoazh en deskadurezh vrezhon, - da gentañ evit gounit eno ar stummadur a emsaver na gavint e nep lec'h all, d'an eil evit reiñ tro da framm an deskadurezh vrezhon ha, da heul, d'ar framm dispac'hel a-bezh, da vont en-dro ha da greskiñ, hep ankouaat e chomo lod anezho evel amaezhidi en aozadurioù-stummañ an Emsav.

Eil poent : drezo emañ an Emsav e kalon ar framm gall. Un arm daoudroc'h e tleont bezañ evitañ. Diouzh un tu ne c'hellont ket mirout a reiñ nerzh dezhañ : pouez ha nerzh ur skol zo e niver hag e talvoudegezh he skolidi; bewech ma enroll ur Brezhon, ha pa ve emsaver, en ur skol c'hall e kreñva ar framm a zo o vougañ e vro. Diouzh an tu all avat ez eo o dlead groñs tennañ korvo eus o savlec'h dre labourat evit ar framm brezhon hag enep d'ar framm gall, e daou c'her : bruderezh ha korzherezh o deus da ren e diabarzh ar Skol-veur.

Bruderezh. Er rann geltieg, - met ar rannoù all n'int ket da zilezel, - o devo moarvat an emsaverion muioc'h a chañs eget e lec'h all da gavout danvez emsaverion : ar brogarour emdarzhek a zegouezh eno kenkoulz hag el lec'hioù lakaet dindan ur skritell vrezhon, keltiek pe rannvroel bennak. Pe emzalc'h ez eus da gaout en o c'heñver ? Kentañ preder an emsaver e tle bezañ o skoazellañ da zont da emsaverion. Da lavarout eo ober bruderezh en o zouez evit an deskadurezh vroadel, o degas d'ar c'helligoù ha da K.D.. Ur fazi bras eo o lakaat da stourm ouzh ar framm gall a-raok ma vent diazezet en Emsav, - rak an eneberezh zo ul liamm ken kreñv hag an difennerezh : stourm ouzh ar framm gall evit un den nad eo ket gwriziennet mat en Emsav zo teurel gwrizioù er framm gall. Ne gomzomp ket eus ar c'hentelioù brezhoneg roet er skolioù gall gant sañset emsaverion nag eus o vertuz-stummañ. Ouzhpenn ma n'eo ar brezhoneg netra drezañ e-unan, e stagañ ouzh ar framm gall zo e zispenn evel benveg an dispac'h brezhon.

Korzherezh. Amañ e kejer gant an damantoù a eztaol hor c'hen-skriver pa gomz eus "difreterezh" (54) ar studierion, pa ra anv a "ober bruderezh a-enep" d'ar Stad c'hall er Skol veur (59), pa ziskouez ar C.A. evel un doare "da vreinañ ar framm gall" (70). E-kichen an danvez emsaverion ez eus difreterion a c'halvedigezh ha na vint morse gouest da vezañ emsaverion. Tu ez eus

bepred da isañ an dud-se da ren fourgas e diabarzh ar framm gall ha d'e skoilhañ par ma c'hallint, peogwir ne vint biken barrek d'ober gwelloc'h. Aze avat e rankomp spisaat : arabat meskañ difreterezh ha korzherezh. An difreterezh zo un dizurzh emdarzhek, hiniennel pe get, oc'h anadiñ e-maez eus reolerezh an Emsav, eleze e-maez pep bellouriezh. Ar c'horzherezh zo un dizurzh kostez framm gall, urzhiet pervezh avat kostez Emsav, reolet gantañ, ha renet e-ser e vellouriezh. Ar c'horzher zo dre ret un emsaver stummet, hag ouzhpenn-se un emsaver desket gantañ micher ar c'horzherezh, a zo ur skourr eus ar gourzhebellezh. Diorren korzherezh e diabarzh ar Skol-veur a empleg enta ur gronn korzherion e gourc'hemenn an Emsav, oc'h arverañ barregezhioù gourzhebelle al lec'h, en o zouez bezañs an difreterion. Aze hepken e kavo an difreterion ul lec'h en Emsav, al lec'h nemetañ int gouest da zerc'hel : bezañ nerzhoù emdarzhek dall, keffloc'het e-ser bellouriezh an Emsav.

An diaester er pleustr eo ne ren ket an Emsav ur vellouriezh kendalc'hel c'hoazh war holl dalbennoù ar vro. E-se ez eo diaes dezhañ amparañ gronnoù korzherion el lec'hioù tomm, ha dav eo dezhañ gouzañv ma ve difreterion o terc'hel an tachennoù ma tlefe-eñ ren an abadenn. An difreterion diouzh o zu a gred, hag a lakfe an emsaverion da grediñ, e reont ul labour emsavel. Graet e vez al labour gant tud n'int ket gouest d'e ober; hag ar re a zo o roll e ober a sell outo hep gallout emellout peogwir n'int ket niverus a-walc'h. Ha n'int ket niverus a-walc'h dre an arbenn hon eus meneget uheloc'h : rouez eo ar Vrezhoned o deus sammet an dislavar diziren a zo e Breizh etre framm sujer ha framm dieuber; rouez an dud ez eo redi didec'hus o buhez hiviziken kas an dislavar-se war-du e ziskoulm.

(69) Pa veneg hor c'henskriver ar C.A. (Comité d'Action pour la langue bretonne) a zo an aozadur o paeroniañ an difreterezh yezhelour er Skol-veur c'hall, o hejañ banniel ar "Culture Populaire", e rankomp dizarbenn ur fazi all a glever embannet e Breizh : sellout an Emsav evel diazezet war bobl Vreizh. Ur sell naturelour eo se, ouzhpenn ma'z eo brizhwerinelouriezh tud a wel an Emsav evel danvez ur renkad-leviañ hag en em aoz endeo da loavañ ar werin evel ma ra levierion ar gweriniezhoù bourc'hizel. Nann. Pobl Vreizh eo a zo diazezet war an Emsav. Etre an div elfenn n'eus nemet unan he deus fetisted ha dalc'h istorek er mare-mañ : an Emsav. Penaos e oufe un elfenn hec'h-unan hep diazez bezañ diazez d'he zro d'un dra all. Amparet eo pobl Vreizh gant an Emsav, da gentañ evel meizad (an Emsav hepken a gomz ent politikel eus pobl Vreizh) hag evel beziad (an Emsav hepken zo embregerezh da ziazezañ pobl Vreizh evel kevredigezh politikel emveliek). Setu perak e rank pep Brezhon dont d'an Emsav da gentañ a-raok gallout ober un dra bennak evit pobl Vreizh. An Emsav eo ar poent-harpañ nemetañ evit dibradañ ar vro.

DANEVELLOU OBEREREZHSkourr an Deskadurezh Vroadel

Bodadeg Vloaz 1969. D'an 9 meurzh e voe dalc'het e Roazhon eil Bodadeg Vloaz Skourr an Deskadurezh Vroadel.

Dalc'hioù labour ar beure a voe gouestlet da zanevelloù obererezh an aozadurioù-kelenn ha -stummañ.

En displegadenn-digeriñ e roas G.ETIENNE da anaout ar c'hlok-adurioù degaset da framm ar Skourr e 1968, al liammoù startoc'h diorreet etre ar Skourr hag an aozadurioù e stumm Rannoù obererezh (Kelenn, Koskor, Kelaouiñ) boutin dezho hiviziken.

Gant G.MAZE e voe graet un diverrañ eus al labour kaset da benn e 1968 gant S.A.D.E.D., savidigezh kentelioù nevez war al Lennegezh hag an Istor pergen. Degas a reas an displeger da gouned eo nepred al labour pleustrek nag an obererezh kevredigezhel un abeg d'an emsaverion evit gwallegañ o stummadur.

Roet e voe danevell Kelc'h Debauvais gant J.F.FURIC. Amañ pell-oc'h e kaver an destenn anezhi.

Roll obererezh Emsav ha raklun hec'h embannadurioù evit 1969 a voe dezrevellet gant M.F.BOUCHER he doe ivez da ziskleriañ d'ar selaouerion stad an darempredoù etre bodad-skridaozañ Emsav hag ensav politikel Emsav Stadel Breizh.

En endervezh e voe bleniet ar gendael war an Deskadurezh e Breizh gant A.E.AR BERR. Ar c'hentañ displeger, Y.OLIER a bouezas gant nerzh war roll ar Stad evel goudor un deskadurezh vroadel frouezhus. An eil displeger, G.ETIENNE, a ziskouezas emañ nerzh an Emsav e stummadur e izili.

Da 16.00, en ur gaozeadenn vuhezek e kontas Ronan HUON, rener Al Liamm, istor ar gelaouenn a zo abaoe ur c'hard kantved ar skouer fetis eus unvaniezh an Emsav.

Danevell obererezh Kelc'h Debauvais. Pevar bloaz 'zo bremañ ez eo bet krouet Kelc'h Debauvais. Mui-ouzh-mui bremañ e kav e lec'h evel aozadur-kelenn ha -stummañ kentañ derez.

Abaoe derou Kelc'h Debauvais eo bet klokaet ar gelennadurezh ha gwellaet an doareoù-kelenn. Diazezet e voe da gentañ kalvezerezh ar c'helenn d'an deraouidi. Setu un diverrañ anezhañ : arveret e vez levr Roparz HEMON ha graet div gentel eus al levr bep sizhun; displeget e vez ar gerioù nevez e brezhoneg e derou ar gentel; goude al lennadenn e vez displeget ar yezhadur e galleg. Aet eo ar c'hentelioù evit an deraouidi d'ober ar rummad kentañ bloavezh. Stadet hor boa ivez e oa ret sevel ur rummad eil bloavezh evit aesaat ar mont-tre en eil derez : un troc'h a chome etre levr Brezhoneg Eeun Roparz HEMON ha live kentelioù S.A.D.E.D.. Krog omp abaoe daou vloaz da ziverkañ an troc'h-se. Aozet ez eus bet danvez kentelioù a live uheloc'h. Goude daou vloavezh arnod

e c'hellomp er bloaz-mañ embann kentelioù evit an eil bloavezh. Geriaoueg al lennadennoù er c'hentelioù-se a denn d'ar vuhez arnevez; enno e kaver ivez elfennoù-diazez yezhadur ar brezhoneg. Evit sevel ar rummad nevez-se omp bet skoazellet gant S.A.D.E.D. ha gant K.I.S. hag o zrugarekaat a reomp.

Abaoe pevar bloaz ne baouez ket Kelc'h Debauvais a greskiñ. E dibenn 1965 e voe savet e Roazhon kentañ kreizenn ar Strollad; e dibenn 1967 e voe savet kreizenn Paris; e derou 1969 ez eus bet krouet ur greizenn e Brest. War un dro e kresk ivez niver ar skolidi. Tri bloaz 'zo ne oa nemet tri c'hlas e Roazhon, etre 10 ha 15 skoliad e pep hini; warlene e voe pemp klas e Roazhon ha daou glas e Paris; hevlene e konter unnek klas en holl : seizh e Roazhon, tri e Paris, unan e Brest.

E Roazhon ez eus pevar c'hlas kentañ bloavezh, daou glas eil bloavezh hag ur c'hlas evit ar vugale. Tri eus ar c'hlasoù kentañ bloavezh (ar c'hlasoù 01,02,03) o deus deraouet e miz du 1968 ha degouezhet int gant o unneket kentel. Ar pevare klas (04), deraouet d'an 08 03 69, en deus graet ur gentel. Ar c'hlas 15 (eil bloavezh), kroget d'an 21 11 68, zo gant e 11t kentel, hag ar c'hlas 16 gant e 9t.

E Paris ez eus daou glas kentañ kentañ bloavezh hag ur c'hlas eil bloavezh. Ar c'hlasoù 21 hag 22, deraouet e genver 1969, o deus graet 7 hag 8 kentel. Ar c'hlas 23 (eil bloavezh), deraouet ivez e genver, zo gant an 8t kentel.

E Brest, emañ ar c'hlas 31, deraouet d'an 27 01 69, gant e 5t kentel. Dizale e vo digoret un eil klas kentañ bloavezh.

En holl enta ez eus bet graet 72 gentel evit ar bloavezh-skol-mañ war ar 150 a vo bet graet e dibenn ar bloavezh.

Chom a ra c'hoazh ur gudenn diabarzh da ziluziañ, ha diluziet e vo a-barzh derou ar bloaz a zeu. C'hwi 'oar e oa bet savet evit Kelc'h Debauvais ur framm heñvel ouzh hini S.A.D.E.D... S.A.D.E.D. avat ned eo ket un aozadur lec'hel tra ma'z eo dasparzhet labour K.D. etre meur a greizenn. Keit ha ma ne oa nemet ur greizenn pe ziv ne save ket kudennoù, met anat eo bremañ e vo ret azasaat ar framm ouzh doareoù douaroniezhel nevez al labour.

Kelc'h Debauvais n'eo ket hepken un aozadur da gelenn ar brezhoneg. Ur gelennadurezh emsavel hollek en deus ivez da reiñ, peogwir ez eus danvez emsaverion eus e skolidi.

Ar re o deus kemeret perzh e Bodadeg Vloaz Skourr an Deskadurezh Vroadel e 1968 o deus soñj e savas kudennoù warlene : tud 'zo a oa en em gavet evel skolidi e Kelc'h Debauvais hep gouzout re vat perak. Hevlene ez eus bet lezet gant pep kreizenn an emell da ziskouez d'ar skolidi pal an Emsav ha ster politikel labour ar C'helc'h hag E.S.B..

E Roazhon hag e Brest ez eo bet diskoulmet ar gudenn-se en hevelep doare. E derou ar bloavezh-skol ez eus bet aozet un emvod-kelaouiñ, eleze d'an 08 du 68 e Roazhon, d'an 23 genver 69 e Brest. A-hed ar bloaz e vez bodet an danvez emsaverion da gemer perzh e displegadennoù e galleg. Teir displegadenn zo bet e Roazhon :

an hini gentañ diwar-benn ar yezh e kerzu 1968; an eil dindan an talbenn : "Petra eo bezañ brezhon ?" e genver 1969; an drede war an armerzh e Breizh e c'hwevrer. E Brest ez eus bet un displegadenn ma voe brastreset istor an aozadurioù-kelenn bodet er Skourr ha lec'hiet kudennoù an deskadurezh e Breizh e-keñver politikerezh dispac'hel an Emsav.

Prantadoù studi zo bet aozet ivez : e Roazhon, un devezh studi e galleg d'an 8 kerzu 68 (sl. EMVR-46, Emsav 25/12); un endervezh studi e Paris d'an 12 genver 69 (sl. EMVR-52, Emsav 26/48); e Brest, un abardaevezh studi d'an 23 genver (sl. EMVR-53, id.).

D'an 10 meurzh 69 e vo aozet e Paris un displegadenn war an isdiorreadur brezhon.

Kreizenn Roazhon Kelc'h Debauvais a drugareka Brudañ ha Skignañ en deus hon skoazellet kalz da brientiñ an emvodoù-kelaouiñ.

Trugarekaat a reomp ar c'helaouennoù o deus embannet danevelloù obererezh Kelc'h Debauvais kaset dezho dre Rann ar C'helaouiñ : Al Liamm, Ar Bed Keltiek hag Emsav.

Trugarekaat a reomp izili Emsav Stadel Breizh o deus kemeret perzh en emvodoù-kelaouiñ hag en displegadennoù.

Bloavezh-skol Kelc'h Debauvais a echuo gant Devezhioù Studi an Deskadurezh Vroadel a vo dalc'het hevlene e Mur eus an 28 gouere d'an 13 eost. Aozet e vo ar c'hwec'h devezh kentañ a-ratozh evit skolidi K.D.. E gwir, warlene, n'o doa ket gallet skolidi K.D. kemer perzh leun e labour an Devezhioù Studi dre berzh an dilive re vras a oa etrezo hag ar berzhidi all. Setu perak e fell dimp ar bloaz-mañ ober a-zevri war-dro an deraouidi e-pad ur sizhun a-raok ma krogo an Devezhioù Studi da vat. (09 03 69)

Kentelioù nevez embannet gant S.A.D.E.D. Abaoe deiz kentañ ar bloaz en deus S.A.D.E.D. embannet :

Lennegezh : Youenn Drezenn. : Sizhun ar breur Arturo (Brb-106); Jakez Riou : Nomenoe oe ! (Brb-107); Al Liamm (Brb-109).

Istor : Breizh eus 1914 da 1930 - An eil Emsav (1) (Han-106).

Douaroniezh : Klokadurioù war armerzh ha poblañs an Unaniezh Soviedel, Sina (Don-106, -107, -108, -109).

Izili ar Skourr a fell dezho degemerout testenn ar c'hentelioù nevez-se o goulennoù digant S.A.D.E.D., 30, Pl. des Lices, Roazhon.

Roll diwezhañ ar c'hentelioù embannet gant S.A.D.E.D. a gaver war Emsav 24/354, EMVR-43.

EMVR-66

DA REIZHAÑ en Emsav 26/64 linennoù 10,14,18; /65 notenn (6) :
angerzh, angerzhel, angerzhioù.
 en Emsav 27/94 linenn 16 (e-lec'h : trabedegezh) :
trebadegezh.

Liesskrivet gant ar gelaouenn.

Ar merour : H. LE MEE.

The first section of the report is devoted to a general description of the project and its objectives. It is followed by a detailed account of the experimental methods used, including the design of the apparatus and the procedures followed during the course of the work.

The results of the experiments are presented in the following section, where the data obtained are analyzed and compared with the theoretical predictions. It is found that the experimental values are in good agreement with the theoretical ones, thus confirming the validity of the proposed model.

In the final section, the conclusions of the work are summarized, and the implications of the findings are discussed. It is concluded that the proposed model provides a satisfactory explanation of the observed phenomena, and that further studies are warranted to investigate the underlying mechanisms in greater detail.

The author wishes to express his appreciation to the members of the research group for their valuable assistance and to the National Science Foundation for their generous support of this work. The work was carried out during the tenure of a grant from the National Science Foundation.

The author is indebted to the following individuals for their helpful discussions and criticisms of the manuscript: Dr. J. D. Jones, Dr. R. E. Smith, and Dr. A. B. White. The author also wishes to thank the staff of the Physics Department for their kind hospitality during his stay at the University of California, San Diego.

The author is particularly grateful to Dr. J. D. Jones for his generous hospitality and for the facilities provided for his work at the University of California, San Diego. The author also wishes to thank the staff of the Physics Department for their kind hospitality during his stay at the University of California, San Diego.

The author is particularly grateful to Dr. J. D. Jones for his generous hospitality and for the facilities provided for his work at the University of California, San Diego. The author also wishes to thank the staff of the Physics Department for their kind hospitality during his stay at the University of California, San Diego.

The author is particularly grateful to Dr. J. D. Jones for his generous hospitality and for the facilities provided for his work at the University of California, San Diego. The author also wishes to thank the staff of the Physics Department for their kind hospitality during his stay at the University of California, San Diego.